


BARR HEOL war Feiz ha Breizh



Maodez Glanndour ouzh e daol-labour

Foto Rojé Laouenan

Niv.81 Mezheven 1974 - Priz an niv. 7 Lur - Koumanant : 25 Lur

TAOLENN

| | |
|---|----|
| 1 Klerg : Hor Pardonioù | 3 |
| 2 Kalvez : Kembre 1971 (5) | 6 |
| 3 Anjela Duval : Roc'h Tredudon Pedenn d'an Ao. Perrot | 11 |
| 4 E. Barzig : An Houidi | 13 |
| 5 Glaoda Jakez : E koun an Ao. L. Herve | 18 |
| 6 P. Bourdellez : e Plusulian ha Plouvael | 22 |
| 7 J.C. : Skol Vreiz : Histoire de la Bretagne | 29 |
| 8 Emglev an Tiegezhioù : Keleier | 31 |
| 9 Lizig : Keginerezh | 33 |
| 10 Klerg : Anvioù-tec'h Bro-Diouvael : Langastpre - Berton | 34 |
| 11 Herve Lanndiern : Bed gwirion ar Yezhoù | 37 |
| 12 Klerg : Plede evit ur Brezhoneg brezhonek | 40 |
| 13 E. Barzig : Piekuch ar genaoueg | 43 |
| 14 Keleier | 49 |

Klerg

Hor Pardonioù

Pa gomzomp eus Pardonioù, ne gomzomp ket eus ar pardonioù diniver koulz lavarout a vez graet e Breizh : pardon ar barrez, pardon ar chapel-mañ-chapel. Dre vras ez int bet dalc'het en o sav, evel ma oant : ofereñn-bred ha neuze goude kreisteiz gousperoù, prosesion ha salud ar Sakramant. Koulskoude, evit pezh a sell ouzh Bro-Dreger, ez eo bet lezet da gouezhañ e kalz a barrezioù kement a veze graet goude kreisteiz : gousperoù, prosesion ha Salud ar Sakramant. Graet e vez ar prosesion diouzhtu goude an ofereñn-bred, hag echu. E meur a barrez gant al lezennoù nevez war al liderezh, e vez lavaret an ofereñn d'ar sadorn da noz ha graet diouzhtu goude, prosesion ar gouloù, kuit a c'hortoz an deiz war-lerc'h. Evel an ofisoù all, avat, ez eo bet gallekaet an ofereñn. Da c'hras Doue, e oa bet, a-raok ar brezel ha goude, savet kantikoù evit ar pardonioù, hag e tale'her d'o c'hanañ er yezh ma oant bet savet. Hennezh eo lod ar pardon evit hor yezh.

*

N'eo ket eus ar pardonioù-se eo e fell dimp komz, met eus ar pardonioù bras en eskopti Sant-Brieg, pa'z anavezomp gwelloc'h ar gudenn. Met ken gwir all war-bouez nebeut, ez eo evit pardonioù bras gouede Breizh : Santez-Anna-Wened, Itron Varia 'r Folgoad, Itron Varia Kemitron, bet gallekaet a-ziavaez d'ar c'hantikoù, abaoe un toullad bloavezhioù, dreist-holl abaoe ar brezel diwezhañ : merkomp evelkent ez eus pardonioù bras hag a zo gallekaet abaoe ur pennad brav a amzer : hini Santez-Anna d'ar 26 a viz

Gouere, hag hini Sant Erwan, e Landreger, d'an 19 a viz Mae... Keit ha ma'z eus bet graet gant al latin, e veze klevet ur brezhenn e yezh ar C'hallaoued hepken. Met abaoe ez eus deuet chenchamant.

Neuze, evit pezh a sell ouzh eskopti Sant-Brieg ha Landreger ? E Sant-Brieg, emañ Itron Varia 'n Esperañs, en deiz diwezhañ a viz Mae, Sant-Brieg, evel ma ouzer, a zo e tu gallek an eskopti : daoust da se, e veze un ofis a-ratozh diouzh an noz evit ar vrezhonegerien, betek ar brezel diwezhañ, hag evit ar prosesion, e veze dibabet kloareged vrezhonek da vont da ganañ ha da bediñ e-touez ar vrezhonegerien a veze pedet da vont e penn ar prosesion. Lezet eo bet ar c'hiz-se a gostez ha neuze gant ar mikroioù laket hed-ha-hed ar ruioù evit sikour an dud da ganañ ha da bediñ a-gevret, n'eus ket ezhomm da lavarout gant petore yezh eo aet an trec'h.

Ar pezh a lavaromp diwar-benn ar mikroioù a zo gwir dre vras evit an holl pardonioù, bras ha bihan.

E Gwengamp, en tu brezhonek eus an eskopti, e veze, anat deoc'h, kalz muioc'h a vrezhoneg, ha goude ar prosesion a-dreuz ruioù kêr hag an tantad war blasenn ar «Blommenn», e veze prezegenn vrezhonek en iliz-parrez. Giz ar brezegenn-se a oa bet torret gant an Ao. Koupel, a blije dezhañ bezañ er penn, ha n'en devoa ket ur bern istim evit ar brezhoneg.

E Pontrev, ur gêr vihan e-kreiz ur sitread brezhonek, e oa fae gant kêriz muarvat klevout ar yezh, rak ken dister ha ma oa tu e veze graet e lod d'ar yezh. Nag a

wech em eus gwelet ha klevet beleien, droug enno spontus, o klemm en askont da se, evel da skouer an Aotrou Jord Andrev (Doue d'e bardono !), person d'ar c'houlz-se, e Beurleudi, kanton Pontrev, E 1939, pa oa bet gouelioù meur ar Sakramant (ha dour-bil, va Doue !), e oa bet savet evelkent ur bedenn divyezhek da vezañ lennet er parrezioù da brientin ar C'hendalc'h ha me hag a oa kure e Kemper-Gwezenneg d'ar mare-se, em boa goulennet ma vije bet lavaret da vihanañ ar pedennoù e latin.

E Landreger, gant pardon Sant Erwan, d'an 19 a viz Mae, e-giz m'emaomp o paouez merkañ, e vez graet gant ar galleg evit an oferenn. Abaoe pell 'zo, e vez sarmonet e galleg ; a-raok ne veze sarmon nemet er gousperoù ha bremañ ez eus un homilienn ouzhpenn en oferenn-bred. Warlene, 1973, e oa bet gousperoù e galleg, traoù dister evit gwir ha nebeut-tre a dud o kanañ. Ar re o doa c'hoant da gaout ur brezegenn ha kantikoù brezhonek a yae kent d'ar Vinic'hi (Minic'hi-Landreger), met eno emañ kont bremañ evel e lec'h all.

E Perroz-Gireg, evit pardon Itron Varia 'r Skêrder pe Skêrled - an eil hag egile a vez lavaret : ur pardon «konkeret» gant an douristed, ne dalvez ket ar boan komz eus ar yezh implijet.

Ur pardon all darempredet da vat e Bro-Lannuon, ez eo pardon Itron Varia Sant Karre, Itron Varia Druéz, e Sant-Karre, ur c'harter eus parrez Lanvéleg, kanton Plistin, stok e Plouared. E-kreiz ar maezioù, e-kreiz ur vro vrezhonek. Pevar devezh e pad : sadorn, sul, lun ha meurzh, hag ar re eus lennerien Varr-Heol hag a garfe anaout istor ar pardon, a c'hello kemer levr Buhez ar Sent, gant an Aotrou Moal (Dir-na-Dor) ha lenn istor Yann Bizien. Ur pardon brezhonek kant dre gant betek ar brezel diwezhañ, ha goude zoken. E renk ar pardonioù all eo bet lakaet, daoust ma tregern bepred ar c'hantikou bre-

zhonek, dreist-holl hini brudet en enor d'Itron Varia Druéz.

*Itron Varia Sant Karre
Mamm da Jezuz, Mamm a Drué
Goulennit evidomp pardon
Chwi zo ma mamm ha ma Itron.*

Warlene, 1973, e oa bet eno evelkent un oferenn bennak e brezhonek, d'al lun pe d'ar meurzh.

E Kernev-Uhel, e parrez Larruen, e chapel Itron Varia ar Giaoded (pe Giaodeg), ez eus bet dalc'het d'ar gousperoù gant kantikou brezhonek ha Mab-Sulon, ur barzh hag ur skrivagner, marv deiz gouel Nedeleg 1972, en devoa aozet ur Magnificat e brezhoneg da ganañ war un ton aezet.

Evit Bulad-Pistien, e ranker klask lod ar yezh er chantikou. E Rostren, evit pardon ar 15 a viz Eost, emañ kont evel-se gant ul lod brasoc'h d'ar c'hantikou galleg.

Met d'ober petra astenn roll ar Pardonioù ; krog ez eo ar galleg - ha n'eo ket abaoe dec'h - da zidronañ yezh ar vro.

Met petra a c'heller ober ? Ar gwellañ respont d'ar walenn-se a-gastiz ez eo bet hini beleien bro-Wened, gant an Aotrou Blanchard, person Kistinig, evel ijiner ha brouder d'an taol-intrudu : goulenn ur sulvezh a-bezh evit ar yezh e Santez-Anna-Wened, d'ar sul 11 a viz Ebrel. Setu amañ adskrivet ganimp, e yezh Varr-Heol ar gouviadenn divyezhek kaset gant person Kistinig d'an 12 a viz Ebrel 1974.

Person Kistinig a zeu da bediñ rac'h ar re yaouank ag (eus) ho strollad hag a soñj gante e vo bepred tu da vout war un dro kristen ha breizhad, da gemer perzh er c'hentañ perc'hinded breizhek a vo aozet e Kêranna-an-Alré d'ar sul 21 a viz Ebrel 1974, gant parrezioù kanton Ploue, evit holl ar Vretoned hag a vourr disklêriañ o feiz gant yezh ar vro, ar re yaouank hag ar re gozh mesk-ha-mesk.

Al lidoù a vo rac'h e brezhoneg.

Da unnek eur : oferenn kentidet gant tri ferson ; prezegenn gant ar beleg H. Kadwellan, skoliour e Kloerdi Kêranna. Da 14 eur 30 : chapeled.

Da 15 eur : gousperoù (aes da ganañ) ha proesion.

Da 16 eur 15 : sonadeg gant bombard hag orgleiz (Jegad hag Ihuel) ; ar gest a vo graet da sikour kempenn an iliz hag an tour.

Deult enta da dremen un devezh santel e-tal Santez Anna, patronez ar Vretoned ha patronez ar vrezhonegerien, peogwir ne rae met gant ar brezhoneg pa gomze ouzh Ivon Nikolazig. Un devezh hag a zougo frouezh sur-mat.

Kent mont hiroc'h, e vefe mat marteze degas da soñj d'hon lennerien eus doareoù ar perc'hindedoù da Santez-Anna-Wened. Hep komz eus perc'hindedoù ul lodenn vat eus parrezioù Bro-Wened o vont bep bloaz da Gêranna a-hed an hañv, hep menegiñ gouelioù ar Pantekost hag a zedenn kalz a dud, ez eus div berc'herinded all : hini ar 7 a viz Meurzh da geñver an deiz ma vo dizoloet delwenn santez Anna gant Nikolazig, e 1625, ha neuze ar pardon bras, deiz gouel santez Anna, d'ar 26 a viz Gouere. A-viskoazh, e oa bet ar 7 a viz Meurzh pardon ar vrezhonegerien. Mar ne faziomp ket, e oa bet torret ar c'hiz-se d'ar 7 a viz Meurzh 1961. Ar pardon bras a oa divyezhek koulz lavarout : beilhadegoù en div yezh, evit ar vrezhonegerien diouzh un tu hag evit ar c'hallegerien diouzh an tu all. Deiz ar pardon e veze un oferenn a-ratozh evit pardonerien Kemper Kernev ha Treger e brezhoneg. Bremañ a-ziavaez d'ar c'hantikou a bep eil e galleg hag e brezhoneg, ez eo deuet Pardon bras Santez Anna da vezañ ur pardon galleg. Dre-se e c'heller kompren ervat youl Gwenediz da gaout un devezh evito en o yezh.

E Bro-Okitania, diwar atiz ar chaloni Salvat (Doue d'e bardono), e oa bet savet «Lo Romavage d'Occitania a Lorde»

(Perc'herinded Okitania da Lourda) evit kaout da vihanañ un devezh evito o-unan er yezh a gomze ar Werc'hez ouzh Bernadeta.

Marteze e vefe tu d'ober gant ar berc'herinded savet gant Gwenediz perc'herinded an holl vrezhonegerien, daoust ma savfe moarvat diaesterioù en abeg d'ar rannyezhoù, neket dreist-holl evit ar c'hantikou, met evit ar prezegennoù. Pell hag amzer 'zo ivez e komzer eus perc'hindedoù da Lourda evit brezhonegerien hepken. Piv en devo intrudu a-walc'h evit kregiñ ? Rak ar perc'herindedoù all hag a vez graet anezho «pelerinajoù breizhat» da Lourda, da Roma, h.a., a zo, dre ret, pelerinajoù galleg.

Met evit ar pardonioù nesoc'h dimp, petra a c'hellfed ober evit reiñ d'ar vrezhonegerien o lod ? Sur-mat ez eus tu d'en em zibab e meur a stumm. Holl ec'h ouzomp penaos, pa vez mesket gallegerien ha brezhonegerien e vez roet lod al leon d'ar c'hallegerien, ha lod ar paour d'ar vrezhonegerien. Dav eo digemmeskañ. Sevel neuze perc'herindedoù e-kichen ar perc'herindedoù «ofisiel», met peurvuiañ d'un devezh all, anez e vo heñvel ar stal : beuzet e vo ar vrezhonegerien, ha koad a-benn a vo eus perzh ar bersoned... Ne lavaran ket e vo ken aes ha lavarout chou d'ur yar ; rak ar pezh a vank d'ar vrezhonegerien ez eo intrudu, pennegezh ha dalc'husted, hag e tro o embregadennoù da vezañ re alies tantadoù-plouz.

Diaes e vefe moarvat degemer evel roll-an-devezh an hini degemeret gant Gwenediz, met da vihanañ un ofis, un oferenn a-ratozh... Ur mestr-aozer, er penn, da lavarout, un den a intrudu, kanerien barrek war ar gan hag ar muzik ha gouest da lakaat ar bobl da gemer perzh el lidoù, ur prezege mat. Petra a zo ezhomm ken ? Gant bruderezh dre gomz ha dre skrid, ispisial dre ar c'hazetennoù... Ret e vefe, evel just, kaout asant personed al lec'hioù-

perc'herinded, met poan am eus o krediñ e vefent krenn a-enep ha dibleg, hep na vefe tu da c'hounit o asant. Ret eo en em deurel en dour ha neuial. Ar bobl, mar keromp, ha mar gouzomp ar stek, a zeuy d'hon heul.
Estreget al labour war dachenn ar perc'he-

rindedoù, ez eus da ober. Met ul lod eus an hengounioù o deus dalc'het bev ar feiz en hor bro ez int evelkent, hag e c'hellont bepred, mar bezont aozet en un doare hengounel ha modern war un dro, ober vad ha bezañ talvoudus da virout bev ar Feiz hag ar Yezh.



A. Kalvez

Kembre 1971

(5)

HARRI WEBB

Meurzh 10.7.71. En ur dremen dre ar bourk, e postan va lizhiri e *Llythymdy* (Lizherdi). Ar ger-se a zo ur stumm kozh : *Suyddfa'r Post* a implijer bremañ. Ne deo nemet an droidigezh eus *Post Office*. Diskouez a ra kement-se penaos e pella tamm-ha-tamm ar c'hembraeg diouzh ar brezhoneg, dindan levezon ar saozneg.

E-kichen *Coleg Harlec'h*, em eus lennet ar skritell divyezhek-mañ :
Parcio 20 munud
Parking 20 minutes

Daoust ha talvezout a ra ar boan lakaat ar saozneg dindan ar c'hembraeg ?

Hiziv eo devezh ar barzh kembraek-ha-saozneg *Harri Webb*. Ganet eo bet en Abertawe, e 1930, ha graet en deus e holl studioù e saozneg. Desket en deus abaoe ar c'hembraeg, a gomz hep diaezamant ebet. Seblant-tout a ra bezañ anavezet dreist-holl evel politiker. Ezel eo bet gwechall eus ar *Welsh Republican Movement*, en deus kuitaet evit *Plaid Cymru*. Er votadegoù da zont, e vo danvez-kannad e Pont-y-Pŵl. Deuet eo amañ evit komz eus e zastumad *The Green Desert*, a ginnig lod eus e varzhonegoù, skrivet etre 1950-70. Met ul liamm a zo etre ar politiker hag ar Barzh. En e skridoù, e klask lakaat ar saoznegerien da brederiañ war ster o c'hymreictod (o c'hembreadelezh), hag amzer-dazont o bro. Koll amzer eo evitañ skrivañ diwar-benn ar broioù all, d'ar pobloù all, diwar-benn o labour. Talvoudusoc'h eo evitañ barzhonegoù diwar-benn *Cymhir*, abati brudet en Istor Kembre, eget diwar-benn ar piramidennoù. Kement-se n'en deus ket harzet outañ d'ober troidigezhioù diwar ar yezhoù all, evel ar brezhoneg. Tamallet ez eus bet dezhañ diskouez kasoni ouzh Bro-Saoz.

Ul lodenn vat eus ar skolidi a zo merc'hed war an oad, eus hanternoz ar vro. Eñ a sant muioc'h eget n'eus forzh piv an droug en deus graet

ar saozneg da dud ar c'hreisteiz, dre lemel diganto o *hunaniaeth* (1), ha dre grouiñ ur gevredigezh trist, hep ster d'ar vuhez, ha digredenn. Bevañ a reont en ur "Gouelec'h" a c'hell glazañ a-nevez. Ne deo H. Hebb na difeiz nag enep ar feiz, met, d'e soñj, ez eus bet skrivet betek-hen re a varzhonegoù relijiel e kembraeg.

Burutellet eo bet hiziv an *awdl* en deus meritet ar gador d'e oberoù en *Eisteddfod* Bangor. *Lleu*, an haroz eus ar *Habinogi*, ha "Doue ar sklêrijenn", a zo bev atav en e vro, n'eo ket hepken en anvioù-lec'h hag en hengounioù, met ivez e buhez ha micher ar mengleuzier, daoust ma ne oar ket hemañ e-unan (2). Hor c'helenner en deus displeget ar varzhoneg en ur ziskouez ar fazioù e-keñver ar varzhoniezh hag ar gwerzaoua, gant harp *Euros Bowen*.

EUROS BOWEN

Ar chañs am eus bet hiziv - a-drugarez d'ar glav marteze - da gomz e-pad an abardaevzh a-bezh gant ar barzh brudet e Kembre. Skrivañ a-ra e gwerzennoù dieub ; bez' ez eo unan eus barnerien ar *Pryddest*, ha ne guzh ket e kav a c'hiz kozh an doare-gwerzaoua hengounel. Evel ma kav a c'hiz kozh romantou Kate Roberts. Da skouer, en he romant diwezhañ, *Tegwch y Bore* (3), e tiskouez an dudenn greiz, ur plac'h yaouank, muioc'h a soursi evit he breur eget evit he c'harantez.

Ar Gorsez evitañ eo al lec'h m'en em vod e peoc'h Kembreiz a bep seurt kredenn hag a bep seurt liv politikel. Setu ster goulenn an Arc'hdroiz : "A oes Heddwch ?" (Ha bez' ez eus peoc'h ?). Goulennet en deus ma ne vefe ket kinniget evel ur sakrifis ed ha bleunioù da Zoue gant an Arc'hdroiz, met kinniget bleunioù hepken, e testeni a anaoudegezh vat d'ar barzh loreet. Gouzout a ra mat e chom gwan levezon ar Gorsez e Kernev-Veur hag e Breizh, dre ma n'eus ket a-dreñv un *Eisteddfod*. D'e soñj, en deus faziet Gorsez Breizh o tegemer gallegerien en e greiz, ha ret e vo dezhañ terriñ e zarempredoù gant Londrez a-raok adskoulmañ gant Kembre.

Lakaet em eus ar gaoz war *Cynan* (1895-1970), anavezet e Kembre evel barzh, eistezvodour (*eisteddfodwr*), ha servijer doujus ar Gurunenn saoz. E 1947, pa oa deuet da Vreizh gant dileuridi ar Gorsez, en doa lavaret din : "We are not nationalists, we are regionalists". E 1970, en doa c'hoariet un dro d'an *Eisteddfod*. Hep goulenn ali digant den, en doa prometet e kemerfe perzh e lidoù Tronadur Priñs Kembre, e Kaernarvon. Ar gelaouenn *Lol*, ur gelaouenn farsus, a reas goap anezhañ, evel just, met ar rouanez a roas dezhañ an titl a *Sgt*. Mervel a reas warlene. Doue d'e bardono ! E-giz marvrad, e kontin hepken an darvoudig-mañ. Gonit a reas ur gador gant un *awdl*, diwar-benn "Yr Ynys Unig" (an Enezenn digenvez). Evel testenn, e tibabas buhez an Tad Damian a yeas da vevañ e-mesk an dud lovr, dastumet gant an Amerikaned en enezenn Molokai, Hawaii, hag a vevas dindan verr-amzer gant al Iorgnez. Unan bennak a damallas dezhañ bezañ dibabet da destenn ur beleg katolik. *Cynan* a respontas en doa dellezet doujañs an holl dre e emroisted. Setu *Cynan*, un den reizh, eus an amzer dremenet...

...Euros Bowen a veul labour an Aotrou 'n Eskob Mullins hag an daou vreur Fitzgerald : John, kelenner war ar Brederouriezh, en Aberystwyth

ha Gregory, person hag eilvaer Llanbedr Pont Stefan. N'on ket deuet a-benn da c'houzout ha prizañ a ra barzhonegoù John (4). N'en deus ket respontet kennebeut hag-eñ e oa dellezek eus ar gador *Awdl Bangor*; Ro-et em eus dezhañ da lenn ur pennad a zo bet gouestlet gant ar *Western Mail* da dri beleg anglikan eus ar c'hreisteiz, hag a glask tostaat ouzh o fobl. Lavaret en deus n'aveze hini ebet anezho. Bevañ a ra, anat eo, en ur bed disheñvel.

AN ARC'HESKOB NEVEZ

Merc'her 11.8.71. Laouen eo an holl gant dilennadur an Dr Gwilym Williams, evel arc'heskob Kembre - zoken Hilda, ar gembreadez kozh, — dezhi war-dro 90 vloaz, hag a heuilh feal an holl gentelioù :

- C'hwi 'ta a zo ezel eus an Iliz e Kembre ?
- N'on ket, ma Doue ! Me a zo Mesla !

E. Bowen a lavar din n'eo ket ken sur-se e vefe kerkoulz an arc'heskob nevez ha Glyn Simon evit an Emsav.

Ar *Western Mail* a embann un disklêriadur gant an arc'heskob nevez diwar-benn ar yezh. Goulenn a ra un ehan-brezel etre difennourien ar c'hembraeg, etre ar re daer hag ar re all. Ne gav ket din en deiz skoet just. Ar re daer eo a laka kaoz ar c'hembraeg da vont war-raok, hag en dro-mañ, lod eus ar re a eneb outo a zo a-du ganto. Talvoudu-soc'h marteze ar c'homzoù-mañ : "Labour a fell dimp, uzinoù a fell dimp, met ne fell ket dimp e vefe distrujet hor c'helc'h-bevañ gant an uzinoù !".

MAR-LERC'H AN EISTEDDFOU

Tud anavezet, ampart ha sirius, a vez goulennet diganto evel just barn an oberennoù kinniget. Kalz a blijadur a vez ivez pa zeu a-benn unan bennak da c'hoari un dro-gamm dezho. E-touez oberourien an heuliadoù a zaouzek barzhoneg e gwerzennoù dieub, kinniget evit kenstri-vadeg ar gurunenn, e oa unan anvet Pius. Barnet sec'h ha garv eo bet diwar leurenn an deltenn vras : "Ha pa vefe bet zoken un heuliad a dalvoudegezh uhel, e vefe bet kondaonet evel bruderezh enep-pabel. Ne deo, e gwirionez, nemet divlaz ha pornografie, tost d'ar falstamallerezh". *Y Faner*, er sizhun-mañ (12.8.71), a zispleg e oa bet aozet bep a c'hwec'h barzhoneg gant daou zen yaouank anavezet, deiz Pesk Ebrel, evit goapaat ar varnerien a vez prest da veuliñ an oberennoù teñval. Dibabet o doa ar babelezh, dre ma oa Paol Vi e Sina, d'ar mare-se. Anzav a reont n'eus nemet falstamallerezh ha pornografiezh en o oberen. Gwech pe wech, e vo gouezet o anvioù moarvat.

E-barzh *Y Cymro* (11.8.71), e lenner un danevell diwar-benn emvod-meur kentañ Kevredigezh ar Skolioù-mamm kembraek. A-drugarez dezho, e teuer a-benn da adkembraekaat ar saoznegerien vihan ha d'o lakaat gouest da heuliañ ar skolioù kembraek.

Kuzul al Levrioù Kembraek en deus goulennet digant Poellgor an Deska-durezh, e Kontelezh Kaernarvon, ma vefe diskarget eus e labour, e-pad tri miz, Ifor Myn Williams, aozer "Gwrez ar C'hornog" (5), evit kregif gant ur romant all. Peur e c'hoarvezzo kemend-all e Breizh ?

AL LENNEGEZH SAOZNEK KEMBREAT

Daou ziviz hon eus hiziv gant Herri Webb hag Euros Bowen diwar-benn al lennegezh saoznek e Kembre. Hervez H. Webb, ez eo ret ober un diforc'h etre amzer Dylan Thomas hag hon hini-ni a zo ur maread nevez en Istor Kembre, maread an azginivelezh. Evitañ ez eo an danvez-se eo a ra al lennegezh kembreat e saozneg. Stag eo ouzh ar gevredigezh kembraegrez hag he zonkadur a zo mont da get.

Euros Bowen a bouez war ar yezh. Ar yezh eo a ra ar vroad. Ar c'hembraeg eo a ra al lennegezh kembraek, n'eus forzh pehini e vefe an danvez. Tud evel Harri Webb a sikour ar gembraegerien da gompren petra emaint e-riskl da goll. Ur "sun-buhez" eo. Ur jubennour a respont egile war an taol. Evitañ eo deuet ar mare da gemmañ furm pe gentoc'h *treñ* (urz) ar varzhoniezh. Trement eo amzer Ceiriog (6) ha Crwys (Helin Trefin). Williams-Parry a zo bet ul liamm etrezo ha ni.

E-pad eil lodenn ar "c'hendiviz", e komzas Harri Webb dreist-holl diwar-benn al labour sevenet gant *Bwrdd Celfyddydau Cymru* (Kuzul Arzoù Kembre), war dachenn al lennegezh kembraek ha saoznek : enoriñ ar skrivagnerien wellañ gant prizioù ; gopraat romantourien e-pad c'hwec'h miz evit sevel un oberenn nevez, skoazellañ ar c'helc'hge-laoennoù hag an embannerien da gaeraat goloioù o levrioù, lakaat treñ skridoù kembraek e saoznek, h.a.. Santet em eus e klaske un tamm difenn ar B.B.C. a zo bet taget, nevez 'zo, gant lizhiri embannet gant ar *Western Mail*.

BALEADENN BETEK MACHYNLLETH

Etre merenn ha koan, ez omp aet da vale betek Machynlleth. E Aberllefenni, hon eus gweladennet ur vengleuz hag ul labouradeg da droc'hañ tablez, enno un tregont bennak a vicherourien. Komzet hon eus ur pennadig gant div blac'h war an oad, azezet war ur bank dirak o zi. Diskouezet o deus kaout kalz a blijadur p'o deus klevet digant ur c'hembread eus Londrez e oa kalz a Saozon o teskiñ o yezh. Siwazh ! ar skol vihan a oa amañ a zo bet serret ha gwerzhet d'ur saoz ! Kaset e vez ur vugale bemdeiz da *Corris Isaf*, gant ur bus.

E *Corris Uchaf* (7) e oa serret al labouradeg, met gweladennet hon eus ar stal vihan a werzh "souvinerioù" graet gant sklent. *Plas* (Maner) Machynlleth a servij bremañ da vaerdi. Un arzour yaouank a oa o livañ poltred Owain Glyndŵr a glaskas adsevel priñselezh Kembre, e deroñ ar pemzekvet kantved. Lakaet em eus va fri e sal vras ar C'huzul. War vorzhol ar c'hadoriad, em eus lennet ar gerioù-mañ : *Doeth pob tangar* (Fur an hini a gar tevel). Aet on ivez da adwelout an ti ma vodas ennañ Owain Glyndŵr e parlamant kentañ, e 1404. Servijout a ra bremañ da sal-lenn boutin. *Y Faner* hag *Y Cymro* a zo e-mesk ar c'helaouennoù.

Betek Dolgellau, e heuilh an hent moan an aod hag aber stêr Dolgellau. Dehved a weler a bep tu d'an hent, e parkoù dispartiet gant mogerioù bili. An diboblañ a ra e reuz ivez : amañ hag aze, mereurioù bihan rivinet ha n'int ket bet prenet gant ar Saozon, peurvanoù dilezet ha plantet gant gwez-pin gant "Komision an Adkoadañ".

War hent an distro, e ran ur pennad kaoz gant ur skolaerez eus diwar-dro Abertawe, bremañ e retred. Emañ o chom e korn Abertawe, met savet e oa bet e kembraeg gant he zud, ha skol he deus graet e kembraeg. Emañ bremañ o reñ ur gentel d'ur saoez azezet en he c'hichen.

Aet on d'an *noson lawen*. Aozet-mat e oa bet gant ar rener. Goulennet en deus daou zen a volontez vat evit c'hoari. O welout ne save den, hon eus en em ginniget, Hilda gozh ha me. Lakaet hon eus c'hoarzhadeg, met ar c'hoari ne oa ket bet ken bourrus. Ret e oa da Hilda ha din-me divinout daou anv-den. Me a oa sañset Owen Hughes hag Hilda ur plac'h eus ar romant *Rhys Lewis*, gant Daniel Owen. Ar c'hoari a oa dreist d'am galloud, ha ret eo bet troc'hañ berr !

NOTENNOU

- (1) *Hunaniaeth* : emc'hloar, emgarantez, enor (Klerg).
- (2) *Cyfansoddiadau* : paj. 9.
- (3) *Tegwch y Bore* : kaerder ar beure (klerg).
- (4) John Fitzgerald, ganet e Bro-Saoz, met a ouenn iwerzhonat, desket kembraeg gantañ hag eo bet c'hraet kembread e-touez Kembreiz. Embannet en deus e 1969, un dastumad barzhonegoù *Cadwyn Cenedl* (Chadenn ar Vroadelezh). Sinañ a ra : **Ieuan Hir**. Setu amañ an *englen* o tigelañ e levr :

*Iaith wâr Sir Gâr a gerais - iaith dirion
aftradlon, hyfrydlais.*

*Rhan a chartref a gefais
yn ei swyn a minnau 'n Sais.*

*Yezh hegar kontelezh Keredigion a garis - yezh tener
brokus, heson.*

*Rann ha ti a gavis
en he hoal, ha me ur Saoz ! (troidigezh frankik) Klerg.*

- (5) *Gwres o'r Gorllewin*. Troidigezh an Ao. Kalvez : «Tommder eus ar C'hornog».
- (6) *Ceirïog* (barzh «telennegel») (1832-87), John Hughes e anv, heñvel a-walc'h e stumm ouzh hini barzhed a Vreizh-Izel, gant gwerzennoù avat, hag a zo gwir fulennoù alies (Klerg).
- (7) Skrivet *Corris Uchelaf* en dornskrid. N'ouzon ket pehini eo ar gwir stumm (Klerg).

Pennad-stur.

Goude-skrid. Ur pevarzek kant bennak a bardonerien a oa diouzh ar mintin en oferenn e Santez-Anna. Goude kreisteiz, e oa ur seizh kant bennak, bugale ha tud en oad, ar pezh a ziskouez ez eo *diæs bodañ tud goude kreisteiz* : pep hini a ya en e roud da bourmen. Met kaer e oa bet ar gouel ha plijet dreist e oa bet an dud - zoken an estrenien a oa dicheañset dezho en em gaout e Keranna, en deiz-se.

Anjela Duval

Roc'h Eredudon

- Pobl va Bro, Tudigoù paour !
Hag aet 'vefec'h 'n hoc'h eil bugaleaj ?
- Pe morse n'emaoc'h en em ziliarnmet
Eus ho kentañ mailhuroù ?
Pa ho klevan holl o youc'hal
Evel ur babig o kounnarin
Pa vez lemet digantañ e chukig
Pe e "nounours" blev hir.
Youc'hal a rit war-lerc'h ho c'hoariell
Tudigoù paour kontarnmet
Ha chadennet ouzh ar skramm
Sklaved maget gant ar dram
A ro deoc'h hep damantin
- Evit ho sujañ muioc'h-mui -
Ar gwasker gall pilpous.

Tri seurt 'm eus : Fent, Mezha ha Truez.
Pobl is a zo ac'hanoc'h
Daoulinet dirak ho mistri gall
O vallozhiñ war ho Tieuberien
O youc'hal war-lerc'h
Ho c'hoariell dorret
Ho Paradozig kollet...
... War-sav ! Va Broiz !
War-sav gant ar vezh !
An Estren hoc'h eus lezet
Da gemer troad 'n ho meskoù
A c'hoarzh diwar ho koust
War-sav ! Hevelien Marianna
C'hoant 'm eus d'ho krabanata.

Pedenn d'an Aotrou Perrot

beleg ha merzher

*D'an 12 a viz Kerzu 1973, da geñver tregontvet deiz-ha-bloaz marv kriz an Aotrou Perrot, person Skrignag, rener Feiz ha Breizh, bragarour ha difennour hor Yezh. Doue d'e bardona !
Ha Joa d'e Anaon !*

- Aotroù Yann-Vari Perrot, abostol ha merzher Breizh, pedit evidomp, Bretoned klouar ha diboeñl.
- Pedit an Aotroù da virout dimp hor Mamm-vro ha da virout ar Feiz e Breizh.
- Obtenit dimp ar c'hras a Emglev, a Gengarantez hag a Sklêrijenn.
- Obtenit dimp an nerzh da stourm evit ar Frankiz, al Lealded hag ar Reizh.
- Obtenit dimp ar c'hras da derrañ hon hual hep na redo gwad hor gwaskerien, ha nebeutoc'h c'hoazh, gwad hor Broiz.
- Aotroù Perrot, merzher, c'hwi hag hoc'h baleet digenvez war hentoù digompez hor Bro, bezit hon skoazell.
- C'hwi hag a zo kouezhet en hent drouklazhet gant un trubard d'E vro, obtenit dimp mont betek penn an hent n'hoc'h eus ket gallet tizhout.
- Obtenit dimp, Merzher benniget, ma vo selaouet Breizhiz pa c'houlennont ar gwir da vout o mistri o-unan en o Bro.
- Obtenit d'ar Vretoned ar sklêrijenn d'en em ren war-du ar Pal a-dreuz tefvalded ha gwidreou spered o Enebourien.
- Aotroù Perrot, beleg divlam, pedit evit beleien Breizh, touellet gant treuzvenozioù ar c'hantved-mañ.
- Obtenit dimp kaout en hor gouenn Kuzulierien fur ha Renerien spiswel.
- Obtenit da Vreizhiz kaout labour ha bara en o Bro, kaout tommer un oaled evit pep tiegezh, kaout nerzh ha yec'hed evit gounit bara ar c'horf hag ar spered gant o labour.
- Roit dimp Kelennerien brogar evit ma vo desket da vugale Breizh Istor o Bro, hor gouenn, degasit dezho soñj eus hon Harozed, Tud-Veur an amzer-gent : Tadoù ar Vro !
- Aotroù Yann-Vari Perrot, c'hwi ha n'hoc'h eus goulennet morse nemet ar pezh 'oa reizh : ar gwir da implijout hor Yezh e pep doare ha war bep tachenn : en ti, er maez, er skol, en Iliz hag en holl zarempredoù ofisiel, obtenit dimp tud ampart da gaeraat c'hoazh Yezh hon Tadoù, ma splanno en oabl al Lennegezh etrevroadel.
- Obtenit dimp ma vleunio a-nevez ar Brezhoneg war vuzelloù ar Plant yaouank e kêr ha war ar maez, ha ma vo douget dre-holl doujañs d'hor Yezh evel arouez ur Bobl kadarn.

Amen.

Anjela Duval

Ernest ar Barzhig

an houidi

"Batist ! Batist, sapredie ! Hast buan, krog eo an houidi da dremen... Petra, pezh didalvez, ret 'vo mont da skeiñ ur c'helorniad dour warnout ?"

Ply a blij dezhañ bezañ dihonet da c'hwec'h eur diouzh ar beure, e Kreiz miz kerzu ?

Ha koulskoude, adalek an eil hopadenn, e voe klevet prenestr an ti nesañ eus ar c'hastell o tigeriñ hag ur vouezh gwaz o respont : "Erru on diouzhtu, Aotroù !"

Ataoe 'zo, ur maresad a-bouez a oa o kregiñ evit an aotroù kont Drian a Dreninon. Netra ne blij dezhañ kement ha chaseal, ha tremenadennoù an houidi gouez war ar Wilen a oa evitañ ar pred gwellañ eus ar bloaz. Gortoz a rae anezhe un toullad deizioù 'zo ha lezel a rae e brenestr digor bemnoz, rak ne oa nemet daou c'hant metr hennak a goadeier sonn etre e gastell Run-ar-Roc'h hag ar stêr. Met brein e oa an amzer e dibenn diskar-ar-bloaz 1817, ne zeue ket ar goañv da stardañ, netra nemet glaveier hag avelaj a-hed an devezhioù hag an nozvezhioù. Fall-daonet evit an houidi. Met war-dro hanternoz, en doa klevet a-walc'h an avel o serzhañ ha gwiblenn an dourellenn vras o wigourat ur pennadig ac'han e voe chomet ar c'hog da sellout ouzh riblenn all ar stêr : "Avel-viz", eme Drian, "mat ar jeu !"

N'o doa ket daleet an evned.

Batist Boulev ne voe ket div deir eur o 'n em houstañ, o tistagañ e zaou gi hag o tapout krog en e ziv fuzuilh. Ne veze ket brav reiñ da c'hortoz d'ar C'hont, ne oa ket drouk, evit larout, ur paotr jentil eo an hini oa, met feuls, ma Doue, feuls ken e oa feuls, evel ma oa e dad kent, Doue d'e bardono, a oa aet betek lazhañ un den. Hemolc'herezh-war-varc'h a oa e ti al Lanvilled, e kostez Plouarzel ; kas a voe a-dreuz an douarou ha tad Drian a oa prest da dizhout ur yourc'h pa voe troc'het e hent dezhañ gant ur c'hastell-eost. Fuloret, en doa tennet war al labourer-douar a voe lazhet-moust. Se a oa ar-raok ar Reveulzi ha ne oa ket bet graet re vil d'ar C'hont el lez-varn : peogwir e oa bet sonet ar c'hernioù-hemolc'h, e tlefe Yann Gouer bezañ sachet e revr gantañ, a-hervez ! E vab Drian n'en doa lazhet den, Doue ra viro, met chomet e oa kañfard, daoust d'e bemp bloaz ha tregont, leun e oa a droioù-kamm, ne chome ket unan en e dreñv. Ne oa ket eizhtez en doa c'hoariet unan farsus-tre. Unan eus e zevezhourien a oa krog da laerezh amann. Setu Drian, goude bezañ taolet ur sell war e voned ledan, e-lec'h e lezel da vont d'ar gêr, e gas gantañ d'ober ur grazadenn dirak oaled ar gegin, e-lec'h m'en doa lakaet ober un tantad tan-ifern. Hag an amann da fontañ ha da ziverañ evel daloù, a-zindan e galabousenn. Met, didruez, Drian a zalc'he da zrailhañ kaozioù, tankil ha brav, gant e vevel ha ne

laoskas anezhañ da vont kuit nemet pa voe labezet holl ar paour kaezh.

Met, pa gomzer eus amann, gwashoc'h en doa graet e-kerz an hañv. Ma plije dezhañ lazhañ houidi, ur gwall-chaseer... klujiri e oa ivez.

Merc'h an n'on-peseurt, unan eus e venajerien, he doa graet fae war-nañ, moarvat. Eñ o kavout anezhi un toullad deizioù goude o vont da werzhañ d'ar foar ur bilbod amann hag ur c'holec'hedad plu :

"Betek kêr ec'h eus d'ober mont evel-se ?

- Ma feiz, ya, Aotroù.

- Deus betek ar c'hastell, ha me a breno pep tra diganit".

Ur wech kinniget d'ar plac'h yaouank ar priz a felle dezhi evit he marc'hadourezh, e reas sin d'e baotr-a-gambr, ur pikol pezh dan, un estrañjour, anvet Flig :

"Hast buan diwiskañ an dieurenn-mañ, dalc'h anezhi war an treuzoù en heol pik, gant hec'h amann war he fenn".

E-keit-se, ar c'hont a rae ur bakadenn skoulmet start gant dilhad e venajerez.

Pa voe lardet mat, druzoni holl kentoc'h, korf ar paour kaezh plac'h, Drian a dapas krog er plu hag e tisac'has anezhe warni. Ret e voe da verc'h ar merer mont betek ar gêr e-giz-se, rak ne zeuas ket e-benn da zizober he fakadenn. Hag ar c'hont da c'hoarzhin, avat !

C'hoarzhin a reas Batist ivez outañ e-unan : "Daoust ha bez' ez on ken kriz hag eñ ? Gwir eo, lavaret ez eus bet din a-wechoù e oan e hanter-veur... Kaset e oan bet war ar studioù gant ar c'hont kozh ha ma n'on ket chomet e dre ma faot... Breur pe get, c'hoariet hon eus asambles, pa oamp bugel... Bet omp o tennañ war ar Re C'hlas, ur wech brasoc'h... Ha'bennoz dezhañ ma'c'h a ken mat ma c'henwerzh-prenn".

Setu ar soñjezonoù a zeue war spered Batist en ur echuiñ d'en em ensac'hañ en e zilhad, e-pad ma tiskenne ur wenodenn eus ar c'hoad, war lerc'h e aotroù a oa krog endev d'ober ged war ar ribl gant e fuzuilh saoz daou-denn. Pa dremenas en e gichen, ar c'hont a lavaras dezhañ e pleg e skouarn : "Sell 'ta, paotr, pegen uhel eo an dour ha pegen buan ec'h a an delioù sec'h war zinaou..."

"Ya, a soñje Batist, o vont sioul da guzh war-hed taol, a-drek ur wezenn, betek ma fello d'ar chas mont war-lerc'h an evned a gouezho en dour ! Evruzamant, en deus cheñchet an amzer ha n'eus ken seblant glav, met, fidam, n'eo ket tomm, na deo, ha noz-du-dall eo c'hoazh".

Erru e oa skornet an daou baotr hag o loened, pa zirouzas un tammig an amzer ha pa sklaeraas un disterañ gorre an dour. E oa strink-andeiz o parañ. Unan eus daou gi ar c'hont a vazailhas gant an anoued ha klevet e voe gant an houidi ez eo ken tanav o skouarn. Kerkent e trégernas trompilh skiltrus ur mailhard... Bourboulh en dour dam-deñval, flapadeg diveskell diwelus... Ur momeg leun a esmae evit ar

chaseer, lammat a ra e galon evel a-raok un emgann, kaletaat ha krisaat a ra ivez, n'eus tamm truez ebet ken enañ evit ar paour kaezh loened dinoaz : ret eo lazhañ. Ur strobard evned a savas, pounner, hag a nijas en amc'houloù evit mont da guzh e koadeier lusennek ar riblenn enep. Pevar denn a strakas, damwelet e voe plu o kouezhañ... Tizhet e oa bet pevar loen ha klevet e voe o difretadenn ziwezhañ du-hont, e-touez brankoù an tu all. Ne reas an daou chaseer fiñv ebet, gout 'ouient boazioù an houidi gouez hag o c'hen-seurterd. Ur vunutenn bennak goude e savas daou loen a bakas pep hini e denn, met mont a rejont ivez da gouezhañ e-kichen ar re gentañ.

Neuze en em lakaas Drian ha Batist da isañ o chas evit mont da ger-c'hat ar jiboez... Met ar paour keizh loened ne seblantent ket troet ramm ebet da vont, unan a chome en e gluch, puchet war e lost, egile, a-hed plad e gorf, e oa aes kompren anezhañ : "Me 'c'houll kentoc'h bezañ lonket..." A-vec'h begoù o zreid en dour, e sellent war-dreñv, al loened paour, gant o daoulagad doujus leun a spont. Kaer en doe Drian o c'hunujenniñ, o bountañ ha skeiñ warne, netra d'ober. Unan anezhe, darc'haouet gant e vestr a-barzh, a neuias ur pennadig war-zinaou, met a sachas neuze e doull er-maez ha, kuit da chom d'en em xifretañ, a dripas herdañ m'helle da guzh war lein an tarroù... Erru ur gont a vezh, lakeda !

Loariañ a reas ar c'hastellour, se n'eo ken bezañ fuloret, met mont da sot !

"Taoe 'zo, Aotroù Kont, eme Vatist, na dit ket da imoriñ, kompren a-walc'h a rit ez a re vuan an dour war-draoñ evit m'houllfe ar chas mont e-barzh..."

- Kroc'hen mil ma reoù", eme Drian, en ur adkargañ e fuzuilh... "Kap eo d'ober o jeu d'an tri gi-mañ, a soñjas ar c'henwerzher, egile en deus graet mat sachañ e foñs gantañ..."

Met, tud paour, darbet e voe dezhañ kaout ur fallaenn pa velas beg fuzuilh egile bantet a-rez e vruched, menel a reas notet ha mot evel ur c'had tapet er ched.

"Peogwir n'houll ket ar chas glebiañ o revr, te, mil gurun, a vo ret dit mont, pec'hed e vefe koll ur jiboez ken lipous... Ale, ma faotr, hast buan en em ziwiskañ... Te a zo un neuier dispont ; pet gwech hon eus treuzet ar stêr a-gevret p'edomp yaouank ? Hanter-kant gourhed evit mont, hanter-kant evit distreiñ, se n'eo netra evit ur gwaz evelldout, zoken pa vez tizh un tammig war an dour... Kas ar c'hevrek-anab-mañ ganit evit ereañ al loened".

Batist a velas a-walc'h ne oa netra d'ober hag eñ noazh-pilh da lammat en dour yen. Ya, ur gwall-neuier e oa. Er c'hreiz, ez eas un tammig gant an dour, met adgounit a reas lañs adalek ma voe tost d'ar bord all. Dastum a reas prim-ha-prim an evned a gavas evruzamant hep poan, sklaeraet ma oa an deiz da vat. Un taol-chase dispar o doa graet : ur pikol mailhard, teir houadez, ur gouzoug-glas hag ur vorvanke.

Ur skoulm start en-dro da dreid pep loen, ar c'hevrek-en-dro dezhañ, hag e-barzh adarre, met ne glaskas ket enebiñ kement ouzh red an

dour ; dont a reas er-maez kalz izeloc'h ha Drian a redas da gas dezhañ e zilhad. Poent e oa, krog e oa Batist da grenañ evel un delienn war ar barr.

"Setu aze ho mallozhtoueoù kanigoù...

- O ! hanter-ouzh-hanter ez omp hag ar mailhard a vo lakaet ez lod !
- Da eo ganin, didiac'h, gounezet a-walc'h em eus anezhañ.
- Ha bremañ, mab, deus ganin betek ar c'hastell".

Bezañ pedet d'ar c'hastell, se avat a blije da Vatist, hag adalek ma voe dirak tantad tan pikol oaled ar gegin, ha ma santas c'hwez ar flip, ec'h ankouzas dour yen ar stêr.

o o

An deiz war-lerc'h, beure mat, e oa adarre ar c'hont dindan breestr e genseurt :

"Hep ! gwaier, poent bras eo dimp mont !"

Met Batist a zeuas da soñj dezhañ eus e neuadenn en deiz a-raok :

"Ya, didie, Aotrou, met me n'em eus ket c'hoant da vont d'en em vezuñ en dour sklaset ha dirollet, na n'em eus.

- Sapre genaoueg, dec'h eo bet diskennet ar vag am boa lakaet en disheol e-pad an hañv...

- Neuze... Mat, emañ o vont".

Re a blije d'ar marc'hadour-koad chaseal evit ober penn kozh, ha neuze morse ne oa bet barrek da nac'h un dra bennak ouzh e aotrou, se a oa kreñvoc'h evitañ.

Setu an daou babor o tiskenn an eil war-lerc'h egile, sioul-sioul, gwenodenn ar c'hoad, kuit a gaozeal, kuit a vac'hañ re an delioù sec'h a vez kement a ragach gante ha paper joget.

Dousik er vag... Drian en doa staget tammoù lien en-dro d'ar roeñvoù, setu ma c'halljont sachañ start warne, a-benn da red an dour, hep tamm trouz ebet. Ne veze klevet nemet kan dister an takadennoù oc'h askouezhañ er stêr. Pa zeuas ar perlez-se da vezañ arc'hantet gant luc'h kentañ an deiz, distailet gant melezour teñval gorre an dour, e laoskas ar chaseerien ar roeñvoù evit kregiñ er fuzuilhoù.

Ne voe ket pell da c'hortoz... A-greiz-holl, e savas al loened... Daou anezhe a gouezhas raktal gant tenn kentañ Drian hag unan all gant an adteñn. Ha lorc'h er paotr, n'eo ket c'hwi lar ! Ul lorc'h a zo dianavez d'an hini n'eo ket chaseer. Batist a bennbouellas ivez un houad gant e fuzuilh kentañ, met an eil avat a c'hwitas ! Pebezh mezh ! Cwashat e voe leun kerkent e galon a fulor kuzhet !

An evned a oa kouezhet o-fevar en dour ha skarzhañ a raent buan er rouz-beure, da heul an delioù sec'h. Petra a dremenas neuze e spred Batist ? Azezet e oa war ar bank, a-dreñv o polañ... A-greiz-holl, e kargas unan eus e fuzuilhoù, a glenkas hini e genseurt e-harz e dreid. Ar c'hont a oa er penn a-raok gant an eil roeñv o ribotat an dour evit esaeañ tapout unan eus al loened lazhet... A-greiz-holl, setu Batist o vantañ e arm hag o huchal d'e geneil :

"Aotrou Kont, hastit buan diwiskañ ho tilhad ha mont war-lerc'h an houidi..."

- Petra, Batist, ne dout ket sot, geo ?

- Geo, da sot ec'h an o soñjal ec'h a da vezañ kollet ar jiboez... Ale, e-barzh, pa lavaran..."

Den ne vez dinec'h pa wel toull du ur bistolenn pe ur fuzuilh troet warnañ... Emichañs, e komprenas ar c'hastellour e oa kement a wad dindan ivinoù e gamarad ha dindan e re, marteze zoken e ouie e oa ar memes gwad... Tennañ a reas e zilhad ha glebiañ begoù e dreid... Didiac'h, ne oa ket tomm, skornet eo an hini a oa... Ha diegi d'ar paotr, hursuniñ a rae, met ar fuzuilh a oa bepred bantet warnañ hag egile en doa e benn-maout... Hag an evned ? E-keit-se, e pellaent gant red an dour... Setu Drian o splujañ hag o neuial... Batist a beulie anezhañ en ur boleñv... Tapet en evn kentañ gant Drian, e feuas d'e zarc'haouiñ er vag ha da glask adkrapañ enni :

"Buan d'ar re all", eme egile, en ur ziskouez beg e fuzuilh.

Ret e voe d'an neuier dastum ar pevar loen ha neuze e sikouras e gamarad anezhañ da addont er vag ha zoken da adwiskañ e zilhad.

Ha penaos ec'h echuas an abadenn, emezoc'h ? Ac'hanta, an hini a vije bet eno en defe gwelet daou ziod o c'hoarzhin, o sklokal kentoc'h, evel krennarded, en ur skeiñ pezhioù pavadoù war diskoaz ha kein an eil d'egile, evel pa veñtet bet mezh pe hanter-drelatet.

Evel ma oa erru pell ar vag war-zinaou, e lavaras ar c'hont d'e vignon :

"Stagomp ar vag amañ, me 'lavaro da Flig dont da gerc'hat anezhi, se 'avelo e benn dezhañ. Peogwir emamp e-keñver ar bourk, deomp da gas un houad d'ar person ha da c'houlenn digantañ ur bannac'h dour tomm hag un dakenn hini kreñv".

Drian a Dreninon ne viras tamm kas ebet ouzh e amezeg Boulev ; er c'hontrol, evel ur vignoniezh startoc'h a oa skoulmet etreze. Da Vatist e veze gwerzhet an holl vez diskaret hag, e gwirionez, ober a rae ar pezh a gare e koadier ar c'hont. E tu-hont d'e genwerzh, en em lakaas war ar sevel tiez, ha dezhañ e voe roet ivez ar c'hastell da zresañ ha da greskiñ. Derc'hel a reas an daou baotr da vont da chaseal an eil gant egile ha lavarout a rae an dud :

"Setu amañ da vihanañ daou vreur hag a zalc'h kloz an eil d'egile, daoust dezhe da vezañ eus daou neizh disheñvel ; yennet e vefe neb a lakafe e viz etreze".

E KOUN AN AOTROÙ LOEIZ HERVE

D'an 19 a viz Here 1973, e Montigne, ti-retred beleien eskopti Roazhon, ez ae trumm da Anaon an Abad Loeiz Herve, deuet d'e bemzek vloaz ha tri-ugent. Doue d'e bardono !

Anavezet mat e oa e-barzh an Emsav, neogwir e stourmas e-pad ar bloavezh hag hanter-kant a greiz kalon evit Breizh.

Ganet e oa e 1899, e Sant-Gregor, nepell diouzh Roazhon, en hanternoz. Gwechall gozh (1303-1316), Yann Diskalseat, ar *Santig-Du* anvet, a oa bet person ar barrez-se, a-raok dezhañ mont da lean fransezat.

Abred e kemeras Loeiz penn e hent etrezek skol-etre Kastell-Jirion evit bezañ eno war e studioù eil derez.

Pa zegouezhas ganin-me ivez mont di da skoliad (1916), er pevarvet klas, e oa Loeiz en eil klas, hag Herri Poisson, an istorour, en hini kentañ.

Edo ar brezel-bed kentañ oc'h ober e reuz dre-holl. Tenn e oa buhez ar skolidi : strishadurioù war ar bara, war an tan - ha, war ar marc'had, strizh-spontus reolenn an ti. Renket ha rannet e oamp diouzh hon oad ; ha ne veze aotreet darempred ebet eus ur rann d'eben, zoken etre breudeur. Setu perak n'anavezis anv Loeiz Herve nemet e dibenn miz Meurzh 1918, er Sul-Bleunioù da noz, derc'hent vakañsoù Pask. Galvet e oa bet, gant ur pemp bennak eus e gamaladed a oad gantañ, da vont d'an arme evit difenn ar Sevenadurezh, ar Gwir hag ar Frankiz a-enep d'ar Varbare. Aozet e voe ul Jid-kimiadif ; ha soñj am eus c'hoazh eus testenn ar brezegenn distaget gant is-rener an ti, an Tad Morin, penidik eus Kintin : *"Ciboria estote et ostensoria... nec non et calices"*. N'o doa ket aon ar gloer er mare-se rak al latin.

O tistreiñ, e 1921, eus ribloù ar Roen, Iec'h ma oa bet o "terc'heil" e dammig tachenn eus bro-Alamagn, Loeiz Herve a antreas diouzhtu e kloerdi bras Roazhon.

C'hwec'h miz en araok, e oamp deuet en ti-se, ni ivez hon-daou, Herri Poisson, disoudardet, ha me, paotr a-boan dizonet. Abred e oan bet "flatret" da Besk, gant ur vrud dizanv, evel un doare istrogell dedennet gant ar brezhoneg ha gant kudenn Vreizh. Pesk va lakaas da gejañ gant Loeiz Herve, e vignon.

N'on ket evit lavarout na peur na pelec'h na penaos e oa deut hemañ d'an Emsav. Entanet e oa da vat, ha kouezhet e karantez gant yezhadur Tata Vallee a zornatae a-zevri-kaer.

Ar mare e oa ma tisklêrie an Aotroù 'n Eskob Charost, en unan eus ar c'homzoù istorek a c'hoarveze gantañ distagañ meur a wech : "N'eo ket bet ar c'hilheien gall lakaet war veg hon c'hloc'hdiou evit rannañ hor c'hredennoù politikel diouzh hon feiz relijiel". Ma ! An triad a oa ac'hanomp a reas e vad eus ur seurt ger-stur ken sklêrijennus ; ha biskoazh n'hon eus asantet disrannañ hor feiz vreizhat diouzh hor feiz kristen. Pleustrif a rejomp gant holl nerzh hor c'halon war an eil hag eben.

Keun ha reizh e tibunas buhez-veleg Loeiz Herve. Beleget e 1926, e voe anvet da gure e Sant-Jakez-al-Lanneier, hag, e 1928, e Sant-Servan. Mont a reas da berson¹ Sant-Leger-Komborn, e 1940, hag e 1943, da berson² Roz-war-Vor, pondalez-prenestr Breizh war traoñienn ar C'houenon ha war vae Menez-Mikael-ar-Mor. E 1965, en abeg d'e galon deuet da skuizhañ, e voe aotreet dezhañ mont da kuzenner ospital ar re gozh e Menez-Kreñv Breizh, a belec'h e teuas en em repuif, e Montigne (1973).

Den a feiz, devot evel un danvez lean, oberiant, kalonek ha pennek, Loeiz Herve en deus labouret kalz evit eskopti Roazhon, dreist-holl e Roz-war-Vor, pa voe dismantret e iliz gant un tangwall. Adsevel a reas anezhi gant kalz a nec'hamantoù, a c'hellit krediñ. Hogen bremañ e sav, faro ha divrall, a-us da bolderioù ar bae, ur c'hloc'hdi nevez e maen-benerezh, gantañ doare meur a gloc'hdi e Breizh-Izel.

Pouezañ a rin war ar stourm en deus renet Loeiz Herve ha war al labour en deus sevenet evit Breizh.

Kregiñ a reas gant ar stourm hag al labour-se er c'hloerdi bras.

Goude bezañ tremenet tri bloavezh oc'h enklask penaos edo ar bed gant ar Vro, da heul 1919, hag o redek war velo e-pad ar vakañsoù dre Vreizh a-bezh (anavezout a rae kement kornad), en em lakaas da ober bruderezh, a-gevret gant H. Poisson, krec'h ha traoñ ar c'hloerdi.

Tu a voe d'ar renerien, d'ar gellennerien ha d'ar studierien da glevout petra oa Breizh : ur vroad wirion, en abeg d'hec'h istor, d'he yezh, d'he speregezh ; ur vroad dispar, evel just, ha kristen c'hoazh, a oa ret, koustet a gousto, diwall ha diorren he feadra war bep seurt tachenn... Pezh na virfe outi bezañ stag ouzh ur stad kevreadelour ha frankizour...

O ! va zud keizh, nag a c'henaouiou a chomas digor !

Ne lavaras an darn vuiañ eus ar gellennerien kalz a dra a-enep. Meur a hini zoken, unan dreist-holl, anezhañ ur "maorasour" touet (Doue d'e bardono !), a gavas dezho e oa reizh seurt mennoziou hag a roas o skoazell hag o c'hred.

Savet e voe darempredoù gant kloareged zo e Kemper (Saig ar Go) hag e Sant-Brieg (E. Brochen) ; hag adalek miz Ebrel 1924, gant aotre penn-rener ar c'hloerdi ha gant bennoz ar c'hardinal Charost,

e voe embannet ur c'hannadig, da zont er-maez teir gwech ar bloaz, da vare ar vakañsoù, ennañ pennadoù gant kloareged evit ar gloareged, ha dezhañ da anv "Foi et Bretagne", oc'h eilc'heriañ da "Feiz ha Breizh" an Aotrou Perrot.

Sammañ a reas Loeiz Herve war e choug labour mererezh ar c'hannadig. Bruderezh a rae evitañ e-touez ar vignoned... hag e-touez an enebourien. Rak ne oa ket an holl a-du, pell ac'hanñ.

Ne badas ket ar "Foi et Bretagne"-se pelloc'h eget mezheven 1925. Echu e oa gant an abad Herve e studioù er c'hloerdi. Ouzhpenn-se, e kavas d'ar renerien e kolve skrivagnerien ar c'hannadig re a amzer. Hag ez ae... unan, d'an nebeutañ, re war-raok.

"Foi et Bretagne" a voe adembannet un nebeut mizioù da heul, dindan stumm ur gelaouenn aprouet a-nevez gant ar c'hardinal Charost (1) ha dindan gontrollerezh ar Vikel-Vras. Kavet e voe da skrivagnerien tud a feson evel H. Quilgars, D. Regnault (ar pardonet) (Doue d'ar fardono !)... ha beleien eus an dibab (n'en deus ket an Aotrou Doue pardonet dezho c'hoazh !). Merour... ha rener an eil "Foi et Bretagne" e voe Loeiz Herve, keit ha ma chomas kure-kelenner e Sant-Jakez-al-Lanneier.

Anvet da gure da Sant-Servan, e 1928, e kejas e bro Sant-Maloù gant an Tad Havard, aluzenner ar vartoloded, kar a-bell, ganet ha desavet du-hont, en deus testeniet din meur a wech pegen bras ha pegen don e oa bet levezon an daou vele-se war an dud yaouank o doa gounezet ha stummet d'ar stourm breizhek.

Adkavout a ris an Tad Havard da Loeiz Herve, d'an 30 a viz Gouere 1940, e Sant-Leger-Komborn. Edo Loeiz o paouez bezañ anvet da berson ar barrezio-se. Fellet e oa bet dezhañ bodañ e vignoned evit rakesellout un tamm, e kement ha ma oa posubl, an amzer da zont, a bromete bezañ espar ha risklus kenan.

Ne chomas e Sant-Leger nemet tri bloaz. Tro o devoe ar barrizianiz koulskoude da estlammiñ, bep miz Gouere, o welout o iliz fichet brav gant bannieloù erminiget, hag o selaou ouzh sarmon helavar o ferson da gefiver gouel Santez Anna.

Daou vloaz warn-ugent e chomas L. Herve e Roz-war-Vor.

Er bloavezhioù kentañ, e c'hwezhe war an Emsav ur gortentenn griz ha gwadek o klask kas da get an dud hag an traoù.

Met ne oa ket anv evit ar beleg gredus da chom sioul en ur barrez bet savet er Vivet kantved gant un drevadennad Vreizhiz tramor evel ur gerdlec'h war harzoù reter Bro-Zo) ha Domonea a-bezh, hag avielet gant menec'h sant Samzun, sant Gehen pe sant Maloù.

Prezeg a rae en iliz ar feiz en Aviel. Hadañ a reas ar feiz e bro-Vreizh dre ar c'hoariva. Er sal vras en doa lakaet sevel, e oa rouez an abadennoù na veze ket enno traoù o sellout ouzh danvez Breizh. Ha, pa veze ezhomm, e kroge "L. Houarneo" en e bluenn hag

e save pezhioù-c'hoari... da skouer : Drama Foz-Hingant, aozet a-gevret gant e vignon "Y. a Veinga".

E 1966, e sell da zihuniñ Bretoned katolik Breizh-Uhel, ha goude bezañ en em glevet gant renerezh ar Bleuñ-Brug, Loeiz Herve, harpet gant ur guchennig tud vat, a gasas en-dro ul luskad nevez : ar "Rénovation bretonne". E gwir, ne felle d'ur seurt luskad nemet bezañ ur skourr eus ar Bleuñ-Brug lakaet da glotañ ouzh doareoù Breizh-Uheliz. Digor e oa kelaouenn ar Bleuñ-Brug d'ar "Rénovation bretonne"... Ne ra ket berzh atav ar c'haozioù gwellañ.

Aet skuizh gant al labour, hag o vezañ ma kroge e galon da c'hoari dezhañ troioù kamm, Loeiz Herve a c'houlennas bezañ degemeret da aluzenner Ospital Montfort. Chom a rae e ti ur c'hoar dezhañ.

Evezh bras a daole ouzh doareoù hag oberoù "Emglev Belleien Vreizh". E amzer vak a yae holl da gas da benn un oberenn stag bras outi mell zo e spered hag e galon : sevel evit an deiziadurioù klok trol klok Sent wirion Breizh ha Dro-Gembre. Al labour-se, a rene a-gevret gant un tad benedat eus Landevenneg, a oa sevenet evit an div drederenn pa voe ar paour kaezh sammet gant an ankoù.

Aon ebet avat n'en deus bet rak hemañ, a zo da gement kelt gwirion ar breur karnet "d'e zegas davet an Tad". A zo kaeroc'h ! Gwelet ac'h eus, Loeiz ker "é poulleù-lagad dijig en Ankeù deù lagad douéel en Hani lakeit-é-kroéz", an Hader hag an Dasprener meur.

Un hader out bet eveltañ, dilorc'h, gredus, dizamant ouzh da boan, morse digalonekaet. Mar gont haderien evelout, pegen kuzh bennak ha kerseüs a-wechoù e vefe bet o labour, e vo reizh lakaat an Eost da zont. "Unan a had, un all a eost". Det ac'h eus dija koulskoude ar joa da welout du-mañ du-hont ar maezioù o c'hlasvezziñ.

"En had hon eus hadet, hor mibion her medo
hadet demb en dareù, ind hen esto er joë.
Hag hor bro diskaret e zihuno ar re,
Adneüet he nerh, adkavet he spered...
Hag estlammein e hrei er Bed koh get he fe."

(1) Ur vreizhadez e oa mamm an Ao. Charost ha, diouzh e glevout, "il avait la fibre bretonne sensible". En ur brezegenn da glozañ Kendalc'h "broadel" Sakramant an Aoter (meulet ra vezo !) (Roazhon 26.07.25) en doa lavaret e oa anezhañ Eskob meur Keltia.

e Plusulian ha Plouvael

I TEZENN KLERG

Goude *dismantroù ar bevare kantved*, e teuas eus Kembre, *war-dro 480-485*, daou veleg gant kenvroiz dezho, *dre Gorseul hag ar Via Strata* (a Gorseul da Wened), betek *Ker-Herve*. Goude bezañ lezet met etreze douaroù ar c'horn-bro hag a oa peuz-c'houllo, e savjont Plouvael ha, *war-dro 510*, e tistrojont da Gembre.

- II EVEZHIADENNOU war - "*dismantroù ar bevare kantved*"
- "*Kembreiz o tont dre Gorseul, e 480*"
- *Dre belec'h e c'hellent dont, ha pegout.*
- *Ar vro peuz-c'houllo hag ar yezh komzet.*

I Daoust ha dismantrou a oa e bro-Arvorig er bevare kantved ?

En drivet kantved ez eus bet reuz bras ; hag ar c'huzhiadennoù-moneiz a zo bet dizoloet a oa bet douaret an darn vuiañ anezhe etre 260 ha 283.

Er bevare kantved avat, ez eo bet adsavet broioù ar C'huzh-heol, nemet ez eo bremañ an doare-bevañ disheñvel diouzh ma oa diagent ; Ar c'hêrioù bras a zo deuet da vezañ kêrioù bihan magoret - ar re a oa pell diouzh an aod a gollas o brud (Karaez, Korseul...) - ha kêrioù a voe savet en arvor (Aled, ar Geoded...).

Ar c'hêrioù kozh o deus kollet o anv hag o deus kemeret anv ar boblañs a veve war-dro : *Fanum Martis* a zo deuet da vezañ *Korseul* (Kêr ar Curiosolited), hag all.

Soudarded a-ziavaez-bro a zo bet degaset er c'hêrioù : Norzh-Afrikaned pe C'hermaned paet gant Roma. N'eus ket nemeur anezhe : tri pe bevar mil.

An dud pinvidik a zo aet da chom war ar maez ; lonket o deus an atantoù bihan en o *latifundia* a 500 pe 2 000 devezh-arat ; ha savet manerioù kaer anvet *villae*. An dud izel a zo sellet evel sklaved ha n'o deus nemet lochennoù paour.

N'eo ket marv ar relijion bagan : an Doueez-mamm, azezet en ur gador aozilh, ur bupel pe zaoou ganti war he barlenn ; Taran, e lein ur pilier, o lazhañ un aerouant diwar e varc'h ; ha re all, a zo doujet c'hoazh gant tud 'zo.

Met ar relijion pristen a c'honez tachenn, dreist-holl abaoe ma'z eo aet impalaer Roma, e penn kentañ ar c'hantved, a-du gant ar Gristenien. Pevar eskob sur a zo e Bro-Arvoreg : en Aled, Roazhon, Naoned ha Gwened, hag iliz-veur Naoned a zo eus ar re gaerañ er bed kristen.

Setu stad ar vro er bevare kantved : n'eo ket ur stad a zismantri !

II Daoust hag e c'hell Kembreiz bezañ bet deuet dre Gorseul, e 480-485 ?

Petra a zo bet c'hoarvezet etre 400 ha 480 ? Roma he deus muioc'h mui a boan oc'h ober d'he sujidi doujañ. Klask a ra en em harpañ war ar Varbared c'herman ; met ar re-mañ ivez a ra penn fall...

406 E 406, en em sav Arvoreg ha Breizh-Veur, peogwir n'int ken difennet gant soudarded Roma ouzh ar Varbared-se (ha ne oar den ebet war beseurt tu e troont, nemet war o zu o-unan !). Ar Jeneral (*Dux Tractus Armorici*) a c'halv an Alaned evit lakaat Arvoregiz da sujañ. N'ouzer ket pe e teuas a-benn eus re ar c'hornog, pe ne zeuas ket. Re ar reter, darn anezhe a dec'has er c'hoadoù ; ha darn all a blegas. E 451, e oa Arvoregiz gant Aetius o stourm ouzh Attila.

483 mad Germaned all, Hlodowig (*Clovis*), roue ar Franked. E 483, e trec'h war Siagrius, hag echu da c'halloud Roma ! Hlodowig a c'houlennas ar vadeziant, hag an eskibien c'hall a cheñchas tu d'o chupenn evit treiñ a-du gantañ.

480... Krog e oa ar Vrezhoned da zont d'an douar bras un nebeut bloavezhioù a oa. En emvod-eskibien Teurng, e 461, e oa un *episcopus Britannorum*, un anv latin dezhañ : *Mansuetus*. N'ouzer ket avat pe e teue eus Breizh-Veur, pe e oa e penn Brezhoned deuet war an douar bras : war al Liger marteze, gant soudarded ur *Riethimus* hag a oa deuet da glask brezel eno e-lec'h chom da zifenn e vro ouzh ar Saizon...

465 Pevar bloaz goude, en em vodas an eskibien c'hall e Gwened, hag e voe sakret Padern da eskob. N'eus ger ebet da lavarout e oa Brezhon ebet d'o heul ; met ul lizher a voe skrivet da c'houlenn ma vije unanet al lidoù-sakr dre ar *provincia* a-bezh, *provincia* Teurng. Daoust ha c'hwen a zo en o loeroù gant aon e vefe un iliz nevez o c'hennel "war o douar" ? Hervez a lavarar, en defe savet Beuzeg e skol vrezhonek, an hini gentañ en tu-mañ d'ar mor, en

460 Enez-Lavred, e 460. A-benn 485, pa zouaras sant Brieg en aber ar stêr Gwad, e oa Brezhoned eno, Fragan unan anezhe : ha sant Brieg e-unan a oa bet er Vreizh nevez ur wech all, a oa bet distroet da

467 Vreizh-Veur, ha deuet adarre da Arvoreg. Hag e 467-472, e oa bet 472 savet kleuzioù brezel e Mael-Pestivien hag e Plezidi ; enep da biv, nemet enep d'ar Vrezhoned e vefe ?

Ha koulskoude, ez eo abredik da lavarout e teue beleien vrezhon da Blouvael e 480, dreist-holl dre Gorseul. Ret eo gortoz un *trégont* vloaz bennak c'hoazh, a-benn ma klevo eskob Roazhon, sant Melan, evit ar wech kentañ, pere a oa doareoù an iliz keltiek hag he misionerien, hag a zeue muioc'h-mui etreze ar sav-heol, ha tre betek e eskopti.

511 E 510, e vije bet marvet sant Brieg ; e 511, e varvas Hlodowig hag e savas e vab Hildeberzh da roue war e lerc'h. Ha nebeut

goude, e teuas ur person eus eskopti Roazhon, Speratus e anv, hag eñ strafuilhet-bras, da gontañ d'e eskob, sant Melan, petra a c'hoarveze en e barrez. Ken daoubennet hag ar person, ez eas an eskob da welout an arc'heskob, hini Teurn, hag e voe skrivet da zaoù veleg brezhon ul lizher c'hwek : tamall a raent dezhe e vezent o tougen da diez o c'henvroiz, a lochenn da lochenn, taolioù ; ha war an taolioù-se, e lavaront an oferenn ; hag e-keit ha ma ro ar beleg da gomuniañ dindan spes ar bara, e ro maouezed da gomuniañ dindan spes ar gwin ; hag ar maouezed-se a reer *conhospitae* anezhe, un anv (ken-lojerezed) hag a zo ennañ peadra da lakaat brud fall d'ar veleien. Rak-se 'ta ha raktel, paouez gant an taolioù-se ; ha kas diwar-dro an aoter ar "mar-c'hedigoù-se" a zo o saotrañ sakramantoù Doue ; ha diwall 'ho degemerfent en o zi ! Ha mar bez ar veleien vrezhon aheurtou, e teuo an eskibien c'hall gant bazh an Ebistel da gastizañ dezhe o c'horf, ha d'o stlepel da santan evit bezañ lonket gant an dilaouled evel gant bleizi marlonk ! Hervez kelennadurezh an Aviel ha Karantez Jezuz-Krist !...

Diaes eo krediñ e vefe bet e Plouvael ur barrez keltiek tregont vloaz pe ouzhpenn a-raok al lizher trenk-mañ !
 E-pad pell amzer e vo div iliz e Reter ar Vreizh nevez, hag e
 563 fello d'an eskibien c'hall ober o mistri warne o-div. E 563, pa'z eas Samzun (Dol) da sened-eskibien Pariz evit klask an emglev gante, e oa c'hoazh un eskob "roman" e kêr Aled, hag e rankas sant Maloù sevel e abati en un enezenn. Kentelius eo lenn, ha pa ne vije nemet en diverrañ a zo e "Buhez ar Sent", pebezh enebiezh a gavas sant Maloù pa'z eas da lavarout an oferenn da Gorseul. Sant Magloar, diwezhatoc'h c'hoazh, a fallgalonas hag a roas e zilez eus e garg a eskob, hag a yeas da ren ur skol da
 590 enez Serk. E 590, e teuas ar Franked a-benn da adaloubiñ Bro-Wened ha d'he "dieubiñ a-zindan yev bonner ar Vrezhoned", eme an eskob gall Regalis.

C'hoazh ur wech, diaes eo krediñ e vije bet savet ur Ploue e Plouvael e 480. Unan eus ar re gentañ a vije bet en tu-mañ d'ar mor. Ken diaes all eo krediñ e vije bet deuet ar bloueziz nevez dre hent Korseul.

III Ma n'int ket deuet dre Gorseul, dre belec'h int deuet ?
 Ha pegoulz ?

Tostañ aod a zo, eo bae Sant-Brieg ; ha bourc'h Plouvaél a zo war ar c'hroazhent e-lec'h ma tifourk hent Sant-Brieg war hent bras Karaez-Roazhon. Dre eno, sur-mat, eo deuet ar Vrezhoned a zo degouezhet e Plouvael. N'eo ket e Kêr-Herve dre hent Korseul. Ma o dije graet o darempredoù gant Korseul, o dije bet diazezet o bourc'h (gwik) e Kêr-Herve e Kroazhent Korseul. Ma o deus diazezet o gwik e Plouvael, ez eo dre ma raent o darempred gant bro Sant-Brieg, e-lec'h ma oa Brezhoned, Pragan ha Riwal, pellik a oa, hag e-lec'h ma touaras sant Brieg, e 485. Gwir e seblant bezañ martezeadenn Klerg evit amzer

donedigezh an danvez-parrezianiz. Daoust ha ken gwir all e c'hell bezañ evit ar bersoned : Mael ha Sulien ?

Demdost keit-ha-keit diouzh Sant-Brieg ha m'emañ Plouvael, emañ parrezioù Mael-Karaez, Mael-Pestivien, ha Plusulian. Parrezioù all a zo etre Plusulian hag an div all, met koshañ parrezioù etreze eo Plounevez-Kintin : nevez, da lavarout eo savet goude reuz an Nor-maned. Parrezioù Mael ha hini Sulien a oa eta stok-ha-stok gwechall gozh.

Peogwir ec'h ouzomp e oa bet un tamm bec'h, e 474-480, etre ar Vrezhoned ha Gall-romaned Plezidi ha Mael-Pestivien, evel ma tiskouez ar moneiz kavet hag ar c'hleuzioù-brezel, e oa eta Brezhoned en em lede, a-benn neuze, dre ar c'horn-bro-se, pelloc'h diouzh ar Franked hag ar Pennoù roman eget Plouvael.

Setu penaos ha pegoulz e tegouezhas ar bloueziz. Ar veleien, avat, daoust hag edont deuet gante ? Peurliesañ, ne veze ket a veleien e-nenn an divroañ : goude e teuent, da sevel ilizoù ha skolioù, ha da veñ kalon hag ali d'an divroidi.

Un anv a zo e-touez ar re a zo bet studiet gant kement a ouiziegezh gant Klerg, hag e tleje bezañ graet evezh outañ : "Breil Tual". Tual, emezañ, a oa unan eus ar Vrezhoned a lodennas etreze an douaroù e Plouvael... Marteze ! Met a-raok divizout krak-ha-krenn an dra-mañ, e vefe mat klask daoust ha n'eo ket stag anvioù Mael ha Sulien ouzh hini sant Tual ? E Bro-Leon, nepell diouzh parrez sSant-Pabu, hag un tamm pelloc'h diouzh parrez Trebabu, emañ Koad-Meal. N'eo ket me a lavaro pe ez eo ar Meal-se anv Mael distaget gant Leoniz pe n'eo ket ! Hogen, e Kernev, demdost da Landudal, emañ Sulien, Koad-Sulien (e Landrevarzeg) ; ha Maez-Sulien n'emañ ket a-bell. Daoust hag a-walc'h eo evit goulakaat e vefe hon daou sant eus beleien sant Tual ?

510 Sant Tual, degouezhet en Arvoreg goude 510, goude marv sant Brieg eta, war-dro an hevelep mare (Aodoù pellañ Penn ar Bed) ha Paol Aorelian, a yeas donoc'h eget Paol etrezek ar Sav-heol hag a savas parrezioù dre Vro-Zomnonea a-bezh : e Pou-Gastell, Pou-Gêr, Pou-Ouelo, Pou-Benteur, ha betek e Pou-Dour ; adalek Montroulez betek Dinan eta. N'eo ket dre ma ne oa netra en e raok, met evit astenn hag urzhiañ muioù-h eget na oa bet amzer d'ober betek-hen, war an tu-se.

530 Hogen Paol Aorelian a voe eskobet e 530. Setu ni pell diouzh ar bloaz 480, kinniget gant Klerg. Setu ni avat e pal da gompren perak e teu an eskibien gall-frank da vezañ nec'het ! E sened-eskibien Teurn, e 567, e tivizont : "Na vezet Brezhon ebet na Roman ebet e Bro-Arvoreg, sakret hep aotre an arc'heskob (*metropolitano*) : hini Teurn) hag an eskibien all a zo en e bprovincia. Ma klaskfe unan bennak hen ober, e vo taolet warnañ ar setañs divizet el lezennoù kanonek a-ziagent".

Evite, emañ diazezet an iliz war an dachennad-douar ; evit ar Gelted, ez eo diazezet an iliz war an dud.

Rak-se e soñjan e oa deuet Mael ha Sulien, kaset gant sant Tual, da Garaez da gentañ, hag ac'hane da Vael-Karaez ha Mael-Pestivien ha Plusulien ; ha goude-se, dre an hent bras, da Blouvaël. Gant studiañ tezenn dokterelezh an Ao. Eveillard war an hent-se, e vije gwelet dre belec'h int tremenet. Ha pa'z int degouezhet e Kroazhent Sant-Brieg, o deus kavet eno ha war-dro, ar Vrezhoned a oa deuet di pellik a oa, ha n'o doa bet oferenn ebet betek-hen, nemet ur wech an amzer ur beleg o tremen gant un daol-goad sakret hag o reiñ dezhe Korf ha Gwad Jezuz ha Komzoù a Vuhez ma o dije kalon da sevel ur Vreizh nevez. Hiviziken avat, o devo ur barrez, kerkoulz ha n'eus forzh peseurt gall. Hag ur beleg dezhe, hag a vezo ur sant, hag a vezo Mael, ha patron ar barrez, e-pad mil ha mil bloaz !

IV Daoust ha peuzc'houllo e oa ar vro pa zegouezhas ar Vrezhoned ? Ha peseurt yezh a gomez ar "Romaned" diwezhañ ?

Daou rummad tud a oa e Galia romanekaet, hag "emgann ar renkadou", pell a oa, etreze. Dizurzhiou ha dismantrou an drivet kantved a oa bet, evit lod ; degaset gant reuz ha drailh ar "bagadoù" (*bagaudes*, e galleg) peizanted en em savet. Trec'het e oant bet, hag ar re binvidik o doa kemeret lañs diwar an trec'h-se evit paouraat ar re baour, lakaat o c'hrabanoù war o douaroù, sevel manerioù kaer war ar maez, hervez giz Bro-Itali : poullou-kouronkañ e-kreiz ar porzh, ha liyadurioù war vogerioù ar salioù. An dudigoù avat, n'o doa ken evit lojañ nemet lochennoù pri pe pod.

Er bempvet kantved, pa en doa ar gouarnamant-kreiz bec'h o stourm ouzh ar C'hermaned a oa o tont hag o vont dre C'halla, e rankas-eñ paeañ darn eus ar re-mañ, an Alaned, evit ober da Arvoregiz sujañ. Arvoregiz ar Reter a blegas dre gaer pe dre heg. Ha re ar C'hornog ? N'ouzer ket...

An dud desket, pe C'hall-romaned pe Vrezhon-romaned, a ouie latin. Melani a ouie latin ; ar "roue" brezhon Riethimus a ouie latin ; e skol sant Beuzeg kerkoulz hag en hini sant Iltud e Breizh-Veur e veze desket latin...

Ha tud ar bobl ? Ar Vrezhoned, desket pe zizesk, a gomze brezhoneg, hag an dud desket a skrive brezhoneg kerkoulz ha latin. Ar pezh na ouzer ket, eo daoust hag e komze c'hoazh darn eus tudigoù Arvoreg Galiane ? Diaes e vo gouzout, peogwir ne skrivent ket. War ur poent eo dleet pouezañ : an disparti a oa etre ar re binvidik hag o "sklavet". Setu un nebeut skouerioù hag a ziskouez ez ae ar "sklavet" a-du gant ar Vrezhoned :

E 470, en e lizher da "roue" Riethimus hag a oa deuet da vezañ mignon dezhañ, Sidonius Appolinarius, eskob Clermont, a skriv : "Douger al lizher-mañ a zo deuet da glemm dre ma'z eo aet e sklaved digantañ, distroet dre zindan gant ar Vrezhoned".

Un nebeut bloavezhioù goude, pa glaskas un aotrou e Mael-Pestivien hag unan all e Plezidi d'erc'hel penn ouzh ar Vrezhoned, daoust hag e kavjont kalz a "sklavet" evit en em gannañ ? Daoust ha ne voe ket gwelloc'h gant ar re-mañ mont war an tu all, ha kaout o lod eus

madoù o mistri ?

E buhez sant Bieuzhi, diskibl sant Gweltaz, e konter dimp e veze degemeret mat gant an dudigoù tro-war-dro da gêr *Sulim* (Kastenneg) prezegerezh ar sant ; met gant aotrou ar maner e voe lazhet, ur sulvezh, e-pad an oferenn.

Skolidi sant Magloar, en Enez Serk, p'edont o c'hoari gant ur c'hozh bag, a voe douget gant al lanv hag an avel betek Bro-Goustantin. Degemeret ken mat e voent eno gant ar bobl, Galiane anezhe, ken e voe roet dezhe ur vagad voued da gas gante d'an enezenn a oa bet fall an eost warni er bloaz-se.

An Aotronez hag an Eskibien c'hall a oa a-du gant ar Franked. Met pa c'hoantaas ar re-mañ lakaat ur mestr frank war Roazhoniz, e lazhas Roazhoniz ar priñs frank ha darn eus e aotronez.

Arabat eo eta lavarout e oa peuzc'houllo ar vro, ha n'o doa ar Vrezhoned netra d'ober nemet lodenniñ *etreze* an douaroù diberc'henn. Atentoù bras-spontus (*latifundia*) a oa a-walc'h eus tri, pevar, pemp, evit sevel ur barrez ; ha n'o doa ar berc'henned c'hoant ebet da ziskregiñ ! Dre gas ouzh o mistri ha gant c'hoant da paout o lod, ar "sklavet" avat, a oa sur-mat gwelloc'h gante mont a-du gant ar Vrezhoned eget bezañ lazhet o tifenn madoù o mistri ha chom da "sklavet" dindane !

Hag a-raok sevel tezenn ebet war ar yezh komzet, e vije ret d'erc'hel kont ivez e oa daou rummad tud er vro, ha n'eo ket sur e komzent an hevelep yezh pa vezent er gêr gant o gwreg hag o bugale.

III Ur vartezeadenn all.

War an anvioù, e tiskouez Klerg poell, gouiziegezh, ampartiz. An Istor avat a zo laosk gentañ. Setu an dezenn a ginnigan e-lec'h e hini :

Er bevare kantved, goude an dizurzhiou, e voe adsavet Bro-Arvoreg ; met enebiezh a oa etre ar re baour, bet paouraat, hag ar re binvidik, a oa bet pinvidikaet...

Er bempvet kantved, beuzet Galia gant ar C'hermaned, ne oa ken Roma evit chom mestrez war ar vro. Kas a reas ur rummad Germaned (an Alaned) d'ober da Arvoregiz sujañ evit ur pennad ; met ur German all, ur Frank, a drec'has war an holl, Germaned ha Romaned, hag a-benn dibenn ar c'hantved ne oa ken e Bro-Arvoreg mestr ebet.

Abaoe 450, d'an nebeutañ, e oa Brezhoned eus Breizh-Veur o tont war an douar bras. Ar re a zouaras en aber al Liger a oa soudarded, hag a reas o annez er vro (ha moarvat e oa re all pelloc'h er C'hornog a-raok dezhe). Ur skol a voe diporet en Enez Lavred ; un abati e Sant-Brieg ; ur ploue e Ploufragan. Ha re all a yeas donoc'h er vro, daoust da aotronez gall-roman klask stourm oute.

Goude 510, dre arvor pellañ Penn-ar-Bed, e teuas Paol-Aorelian ha Tual en Arvoreg ; ha Tual a pemeas warnañ ar garg da ziazezañ a-dro-vat ploueoù etre Montroulez ha Dinan. D'ar Vrezhoned a oa deuet dre Vael-Pestivien ha Plezidi, ha d'ar "sklaved" a oa aet a-du gante, e kasas daou veleg : Mael ha Sulien. Diwezhatoc'h, ez eas an daou-mañ etrezek ar Reter, o heuliañ hent bras Karaez-Roazhon, evit mont da sevel ur barrez all gant Brezhoned all a oa deuet a-hed un hent all : an hent a zeue eus bae Sant-Brieg dre ar "*fundus Ifniacus*", Menez-ar-C'hont ha Plouzal, hag a zifourke war an hent bras e-lec'h ma savas ar re-mañ bourc'h Plouvael. Ar Vrezhoned nevez-deuet n'o doa ket gortozet an daou veleg evit lodennañ etrezek an douaroù ha reiñ o lod eus an atantoù bras da "sklaved" an doareez gall. Labour an daou veleg a voe krouiñ ilizoù ha skolioù, hag er skolioù-se e veze skoliet ar vugale e latin (evit traoù an Iliz) hag e brezhoneg ; enne e c'helle bugale al latinegourien dont da eskibiñ latin ha brezhoneg.

E Korseul avat, en amzer-se, e oa un eskob "roman", hag a oa evel an holl eskibien c'hall, a-du gant ar Franked hag enep ar Vrezhoned. Kaeroc'h a zo : ne gaver skouer ebet da lavarout e vije aet tud ar bobl a-enep d'ar Vrezhoned, nemet kêriz Korseul a-enep da sant Maloù !

Gwashañ enebourien ar Vrezhoned divroet eo bet an eskibien c'hall. Deuet e oa ar re-mañ a-benn da lonkañ ar Franked papen, gant skoazell ar re-mañ, dre ar gwad hag an tan, da ziskar ar C'hermaned all. Ar Romaned a oa echu dezhe e Galia. Ne oa nemet ar Vrezhoned ha ne felle ket dezhe plegañ na d'ar Franked na d'o eskibien. En anv "an Aviel, Karantez Jezuz-Krist, an unaniezh hag ar gumuniezh", e talc'has koulskoude an eskibien c'hall e-pad kantvedoù da zrouk-komz ha da damall Breizhiz. E 465, e felle dezhe e vije "unanet" lidoù an Iliz keltiek gant o re, da lavarout eo : mouget. War-dro 511, e skrivas Melani e lizher d'an daou visioner keltiek. E 567, e tivize an eskibien c'hall e vije ret goulenñ aotre dipante a-raok sakriñ un eskob breizhat ! Hag e-pad pell amzer poude, e talc'hjont da lakaat evel-se ar palloud gall dreist ar spered kristen a frankiz evit pep pobl dindan lagad an Tad a zo en neñv.

NOTENN GANT KLERG

Trugarez d'an Aotrou Bourdellez evit e studiadenn a berrmeto sur-mat

resisaat meur a boent er pennad embannet war niverenn 80 *Barr-Heol*. Re alies e vez gwelet studiadennoù war ar gelaouenn hag a vefe tu da resisaat, ma karfe hol lennerien kemer ar bluenn...

Da c'hertoz distreiñ war respont an Aotrou Bourdellez, setu un nebeut evezhiadennoù :

1) Evit pezh a sell ouzh ar bloaz ma voe savet Plouvael, ez eo diazezet war amzer abadiezh sant Kadvan ha n'ouzer ket ez-resis peur e voe anvet da Abad Enez Enlli. Darn a lavar etre 516-542, hag ar *Bisgraffiadur Cimreig* a lavar gant ur pik-goulennata : "Sant Kadvan

a vleunias e 550 ?" (paj.55). Diouzh ar bloavezhioù a gemerer da ziazeze, e c'heller kaout un 30 bennak pe 40 a vloavezhioù : 460(5)-520(5).

2) An Aotrou Bourdellez a gomz eus tabutoù etre tud a iliz : eskob roman Korseul ha sant Maloù pe sant Manloar. Met ne oa riskl ebet moarvat, ma ne oa nemet tud lik eus an drevidi gentañ a zeuas da Blouvael, e vije savet trouz ha jeu. Ha zoken gant Mael ha Sulien, beleien hepmuiken ?

3) D'am meno, n'eo ket e bourc'h Plouvael eo e oa ar c'hroaz-hent a gomz an Aotrou Bourdellez diwar e benn, met e Breil-Tual : eno edo hent Roazhon-Karaez, hag a-boan un hanter-lev ac'hano ar *Via Strata*, hent Gwened.

Dre Blouvael, evit gwir, e oa an hent berrañ eus Sant-Brieg da Kened. An hent kozh-se, ur skouer a-blasoù eus teknikelezh an Ilinourien roman, a zo aet da fall pell hag amzer 'zo. Graet e veze a-vezhañ : hent an Dreinded (Porc'hoed) pe c'hoazh, e romaneg Plouvael : "*chemin de Crassebouille*" (yod ha fankigell !).

4) Mat-tre en deus graet an Aotrou Bourdellez o venegin kom-pagnuned-se. Met daoust ha ken sklaer-se eo hon eus da ober amañ gant an hevelep tud ? Kalz eus an anvioù-se a oa boutin a-walc'h. Ha petra eo evit gwir Plonevez-Kintin ha peur eo bet savet ? Ha Mael(-Karaez), pa gaver stummoù evel *Mezle* (1330) ha *Medle* (XV^e kantved). Ha Sulian ? Peseurt Sulian ez eo ?

Hogen, c'hoazh ur wech, bennozh Doue d'an Aotrou Bourdellez evit e studiadenn gaer.

SKOL VREIZ : *Histoire de la Bretagne et des Pays celtiques*, 2^e partie : *L'Etat Breton de 1341 à 1532*.

Embannet eo bet, nevez 'zo, gant kevredigozh ar gelennerien, *Skol Vreiz*, an eil levr eus hec'h Istor Breizh. El levr kentañ, embannet e 1970, e lavared e vefe tri levr : 1) eus an orin betek 1341 ; 2) eus 1341 betek 1789 ; 3) eus 1789 betek bremañ. Echu eo an eil levr gant 1532 ; ha gwel eo evel-se, rak merkañ a ra ar bloaz-se fin ar frankiz evit Breizh.

Hardizh e oa ar pal : kinnig d'ar skolidi Istor Breizh hag istor ar broioù keltiek, gant ar fiziañs e chomfe e spered ar skolidi ar soñj n'eo ket eus pobloù Tramor Breizh estrañjourien evit ar Vretoned. Evel just, berr-tre eo ar pajennoù diwar-benn ar broioù-se : n'helled ket ober en un doare all.

Savet eo bet an obereñn, dre vras, evit skol an eil derez : al levr kentañ evit ar c'hwec'hvet hag ar pempvet, an eil evit ar pevare hag an trede, an trede evit an eil kelañhiad. Resisaat a ra ar raktlavar e oa graet al labour ken evit ar gelennerien, ken evit ar skolidi. Gwell a se l rak, en desped d'ar reizhadurioù, daoust hag e vezo kelennet dre-holl Istor Breizh ? Daoust hag e vezo prenet al levr gant an tiegezhioù ? Ouzh-penn-se, an destenn-mañ-testenn, ar ger-mañ-ger a zo diaes da intent evit ur skolidi bennak : "*la vénalité des charges*", *« le renversement de la conjoncture »*... Krediñ a reomp eo bet dija graet d'an oberour an evezhiadennoù-se, rak e fin al levr, ez eus ur roll gerioù diaes. Evit ar c'helenner, ez eus aze ur benveg priziuz, savet gant tud a vicher, gant kartennoù, taolennoù, da lavoùdegezh, a laka aesoc'h labour ar mestr evit displegañ darvoudoù an Istor.

Graet eo bet labour al levr kentañ gant un oberour hepken. E kenlabour eo bet savet an eil rann. Marteze ez eo un tammig re hir ar pajennoù diwar-benn ar Gelted kozh eus Kreiz-Europa ; kaset e vez pell al lenner diouzh framm istor Breizh e-unan. Hevelep tra evit an eil levr : re a linennoù diwar-benn

darvoudoù istor Bro-C'hall, n'o deus ket kalz a dra da ober gant istor Breizh. Evelato, evit ar c'helenner, setu aze doareoù a ro dezhañ tro vat da lakaat aesoc'h an darvoudoù en o lec'h a-dreuz istor ar Bed. A-hend-all, eo ret anaavezout istor ar Bed da grompen mat ur bajenn bennak eus an Istor Breizh-se : da skouer, an destenn diwar-benn *Emrann vras Iliz ar C'huzh-Heol*. Lezet e-unan, e vezo ar skollad kollet un tammig.

Bez' ez eus en eil levr meur a bennad mat (muioç'h eget boaz el levrioù ken berr all) diwar-benn an armerzh, ar c'henverzh, melestradur an dugelezh : setu aze ul labour arbennigour. Diaes eo lakaat dielloù a dalvoudegezh diwar an armerzh a-wechall-gozh. Ar furcher zo en arvar da lakaat da vezañ groñs pe da astenn fedoù bevnet en amzer pe en ec'honder. Da skouer, nec'het eo al lenner o weler (p. 50) ez eo, er XVvet kantved, maeziou Breizh isdiorreet, met p.60 : « *Le pays de Bretagne n'a pas saït alors par la paix, mère de la richesse* » (diouzh B. d'Argentré) (« *Edo Bro-Vreizh o vleuniad erc ar peoc'h, mamm ar binvidigezh* »). Pe p. 72 : « *Bretagne est Pérou pour la France* » (Breizh-se eo Peru evit Bro-C'hall). Evel just, o sellout ouzh doare-bevañ an amzer a-vremañ ha doare-bevañ an amzer-se, edo maeziou Breizh isdiorreet ; met, ha ne oa ket memes tra e broioù all Europa. Dav eo bezañ evezhek-tre o tisklêriañ an dielloù ; ha dibaot eo an dielloù a-bouez war an amzer-se.

El levr kentañ, e kaver ivez un disklêriadur ha na glot ket gant mezoioù ar chaloni Falc'hun. Lavarout a reer e voe trovadennet aes Norzh ha Kornog an Arvorig gant ar Vretoned dre ma chome c'hoazh bev ar galianeg, ur yezh tost d'ar brezhoneg. E kontrol, dalc'het penn o deus Gwenediz a-enep d'ar Vretoned, dre ma oant bet romanekaet. Ar chaloni Falc'hun avat a lavar ez eo ar gwenedeg a-hiziv treuzvevadur ar galianeg : neuze ne oa ket marv aze ar galianeg ! Gant piv emañ ar wirionez ? Krediñ a reomp hepken ec'h enebas Gwenediz ouzh ar Vretoned (deuet diwezhatoc'h marteze), dre demz, evel a-raok, a-enep ar Romaned, evel diwezhatoc'h a-enep ar Jakobined pe a-enep an Alamaned e-pad ar brezel diwezhañ.

Daoust ha ret eo notañ faziouigoù pe droioù laosk ? Ya, marteze, evit ma vint reizhet a-benn kentañ tro ma vo adoulet al labour. Lavarout a reer div wech e voe renet divroadur ar Vrezhoneg gant an Dierned hag ar venec'h ; div wech ivez (p. 64 ha 102), ne voe ket degemeret Dol da arc'heskopti gant ar Pab. Koulskoude, roet en deus, meur a wech, ar Pab ar *pallium* da Zol. Ar *pallium* a veze ardamez un eskob-meur, « Primad Breizh ». Evel just, ne blijer ket an dra da arc'heskob Teurgn na da roue Bro-C'hall. Lavarout a reer e voe le an duged da roue Frañs « gwazonezh-a-sujidigezh ». Chomet eo atav an dra en amc'houlou. Ret e voe da Bêr Brizhloareg, dre nerzh ar roue Fulup-August, ober al le-se. Pêr avat ne oa nemet eilrener, anvet gant ar roue. E vab, Yann Rouz, dug Breizh, en deus nac'het al le-se, nemet evit e zomaniou lec'hiet e Bro-C'hall (Monforzh-l'Amaury, da skouer). Disklêriet groñs eo an dra gant istorourien Breizh : nac'het o deus an duged diwezhañ (XVvet kantved) al le-sujet a sujidigezh, en ur lavarout, d'an ampoent-se, e felle dezho ober al le « en hevelep giz hag o diagentid ». Ur faziig, p. 112 : Arzhur Richmond *eontr*, ha n'eo ket breur an dug Frañsez kentañ ; faziig-moulañ ivez evit eured Anna Vreizh gant Karl VIII 1491 ha n'eo ket 1490. Ha p. 61 ha 63 : pæron iliz Penmarc'h : sant Nonna, ha n'eo ket santez Nonna. Faziouigoù...

Marteze, e kavo hini pe hini diblaen ha drailhet an destenn ; met alies e vez kont evel-se gant pep levr-studi, dreist-holl evit ar skoldi yaouank. Neuze, d'an neb a fell dezhañ sevel un diviz kompez, eo dav klask levrioù all (ha bez' ez eus !). Met diouzh pal allevr-mañ, ez a ar perzhioù mat dreist ar mankoùigoù, hag a-bell ! Ha n'hon eus lavaret tra diwar-benn ar skeudennadur ; dibabet mat eo bet al luc'hskeudennoù ha dreist-holl an dielloù a lies doare ; dibabet mat ivez an arroudennoù. Ha n'hon eus lavaret tra diwar-benn ar spered breizhat a enaou an oberenn-mañ penn-da-benn : a-hend-all, penaos ober ul labour aseurt-se, ma n'eus ket a gredenn start er galon ? Setu aze un Istor Breizh muioç'h : n'eo ket dreist-ezhomm, pell ac'hano ! Bez' ez eus lennerien a bep seurt. Dav eo kinnigañ da bep hini boued diouzh e c'hoant. N'anavez ket ar Vretoned Istor o bro (un tammig dre o c'hiriegezh) ; setu perak ne vezo biken re baot al levrioù d'hen displegañ. Gourc'hemennoù da oberourien an Istor-se ; ha chañs vat d'o labour.

J.C.

KELEIER EMGLEV AN TIEGEZHIOU 30, leurgêr al Lisoù 35000 Roazhon

Niverenn 15 - Meurzh 1974

« En hor yaouankiz eo bet fiziet
gant Doue amzer da zont hor bro. »

Y. V. PERROT

« Emglev an Tiegezhioù » e Bro-Skos.

A Future for Gaelic, gant Iain Glas.

« *Keit-ha ma chom bev un elfenn...* ». Diverrañ diwar ur pennad-skrid kinniget gant ar gelaouenn *Catalyst for the Scottish viewpoint* (Goañv 1974).

Kaset zo bet strolladoùigoù bugale e Bro-Skos da lakaat anezho war ar gouezeleg gant ar c'hoari. Ouzhpenn daou vil gouezeleger zo e Din-Edin. N'eo ket barrek o bugale avat da ober ingal gant ar c'hoari. Gant ma tale'hint da zarempredañ ar strolladoù-c'hoari-mañ, e teuint a-benn da ober gant ar gouezeleg er vat.

Strollad zo bet savet hag emañ o vont en-dro. Reoù all a vo savet, moarvat... ha da c'houde, un « Emglev » d'o frammañ tamm pe damm.

Enlaket e vo aozañ kentelioù war ar yezh evit ar re goshoc'h. Ober gant an doareoù a-vremañ da ober perzh.

Ar ment kenstur gant red ar vuhez ne chomo eus ar gouezeleg met ur yezh skrivet brav el levrioù. Strollad da lakaat dic'hoanag du da waskañ speredoù bugale hor bugale a soñjo gant trididigezh en amzerioù-hont, kent ne voe dieubet ar Vro pa rae c'hoazh gant ar Yezh tud o fobl.

Boxed ene evit hor bugale

Ha ar ya da sevel, pe da adaozañ, testenn ul levrenn gatekiz leun ha bouedek da vezañ embannet gant *Emglev an Tiegezhioù*, pe e kenlabour gantañ ? Pe gant tud all marteze ?

Pezh a gont eo kaout boued speredel da reiñ d'hor bugale e brezhoneg, d'o sikour da anaavezout gwelloc'h ar wirionez dre hor yezh hag ivez da gemer perzh el labour evit Rouantelezh Doue.

Pennemvod E.A.T. e 1973

D'an 22 a viz gouere, e voe ar pennemvod, e Kintin, er Greizenn Yann XXIII evel boaz, e voe nebeutoc'h a dud (30 anezhe) er pennemvod eget en emvodoù ordinal. Eürus e oamp o kaout en hon touez un iwerzhonad, an Aotrou Thomas O' Cheale hag e wreg. Hemañ a reas un tamm kaozeadenn o kenverian al labour evit ar vroadelezh en Iwerzhon hag e Breizh.

Goude bezañ renet kont eus labour ar bloavezh tremenet, e voe divizet kenderc'hel gant al labourioù war al lec'h ha gant an tri emvod bep bloaz evit Breizh a-bezh. Divizet e voe ivez sikour retred speredel Louaneg e miz gwengolo hag an devezhioù bruderez evit ar gelaouenn *Evit ar Brezhoneg*, e miz kerzu, hag ivez kas d'ar muiañ posubl a gelaouennoù an disklêriadenn « Doujañs da vuhez an dud ».

Da echuiñ an devezh, e voe an ofereñn gant an Aotrou Barbotin, e chapel ar Greizenn.

Buhez an Emglev abaoe pennemvod 1973

- d'an 28 a viz Gouhere, o deus lod eus tud E.A.T. kemeret perzh en ofereñn hag el lidoù war dachenn-emgann Sant-Albin-an-Hiliber ;

- d'ar 7 a viz Gwengolo, ez eus aet un dek bennak eus tud kreizenn E.A.T. Roazhon d'an Naoned evit kemer perzh en emvod hag en dibunadeg a-du gant Naoned e Breizh ;

- d'ar 7, 8 ha 9 Gwengolo, o deus un nebeut tud eus *Emglev an Tiegezhioù* kemeret perzh er retred diwar-benn « ar Feiz » savet e Louaneg gant *Umuniezh Speredel Breizh*. Bennozh Doue d'an Unvaniezh evit an devezhioù priziuz-se hag evit bezañ lakaet ar retred dindan paotonezh *Emglev an Tiegezhioù* ivez. Salv e vo meur a hini eus ar seurt-se !

- d'ar 14 a viz Here : emvod an diskar-amzer e Kêranna-Wened. Glav-bil penn-da-benn an devezh.

Daoust da se, e kemeras perzh un 40 den bennak en devezh. Eürus bras omp bet o welout en hon touez un nebeut tud yaouank, deuet a-ratozh-kaer eus an Naoned. Degaset o doa ganto ur c'hasadadig douar eus o bro hag a voe mesket gant douar Sant-Albin-an-Hiliber, degaset gant tud Roazhon. Strewet e voe an douar-mañ war dachenn monumant ar re varv, dres dirak plakennoù eskopti an Naoned.

31

Ur c'harr-boutin leun a oa deuet eus Roazhon, ha koulskoude, lod eus an dud-se a oa bet tangwaller o zi en noz a-raok. D'bet e oant daoust d'ar reuz en o zi, daoust d'ar moged lonket, daoust da skuizhder un noz hep nemeur a gousk. Lod all a vefe chomet er gêr...

A-vec'h etru ar c'harr-boutin war an dachenn, setu unan eus pennadurezhioù Kêranna o vont a-drumm da dud Roazhon oc'h erbediñ groñs dezho chom sioul, hep ober reuz na skandal e Kêranna! Biskoazh kemend-all ! Tud 'zo a gav re glouar *Emglev an Tiegezhioù*, hemañ avat a seblante kredin e oamp spontourien vraouac'hus mennet da lakaat reuz ha dispac'h e-lec'h ma'z omp !

Ar pep brasañ eus an devezh, nemet al lidoù e Monumant ar Re Varv, e chomas an dud en ur sal en disc'hav : kendivizoù, c'hoarioù. A-raok kuitaat, e kemeras perzh an dud e Sakrifis an Oferenn. Da lidañ an Oferenn-mañ ganeomp, en em gavas un toullad brav a vignoned a Vro-Wened.

Trugarez da *La Liberté du Morbihan* evit he luc'hskeudenn hag he rentañ-kont !

— Hag evel just, ar vuhez hag ar stourm pemdeziek, e pep kreizenn, e pep familh.

— Moulet eo bet an traktoù da reiñ brud da *Emglev an Tiegezhioù*. Embannet e oa bet an destenn war niverenn drementet hor follenn geleier. 520 lur a brofoù a oa bet roet da E.A.T. evit o moulet. 11 000 skouerenn a zo bet moulet. Bennozh Doue da gement den en deus bet profet arc'hant hag ivez da *Guzul ar Brezhoneg* en deus graet kemend-all.

Ar re a garfe kaout traktoù a c'hell goullenn digant Kreizenn Roazhon pe hini Vrest : 25, stradañ Leon-Harmel.

Obidoù Herve ar Menn en Hañveg, d'an 9 a voz eost 1973. — Kimiad *Emglev an Tiegezhioù*.

Daou-ugent vloaz 'zo, goude taol-tarzh ar 7 a viz Eost 1932, e Roazhon, ez aen e darempred gant paotred ar Strollad Broadel hag ivez gant an holl stourmerien a veze o labourat a-lazh-korf, bemden Doue, da zihuniñ nerzh hag ene ar Vretoned.

War gement tachenn ar stourm, em eus kejet gant Herve ar Menn abaoe.

Emzalc'husted, e lealded, hag un tamm mat a bennegezh a lakae talvoudus-bras daremprediñ anezhañ : kalz levenez a ziskouezas Herve ar Menn o tegemer keloù ganedigezh *Emglev an Tiegezhioù*, da lakaat bev adarre brezhoneg ar vugale vihan. Kalz a zoujañs a oa ennomp-holl e-keñver Herve ar Menn, ha kennerzh bras e oamp bet gant e skoazell.

Da zegemer Herve ar Menn, deuet en-dro da vro e dud, goude ur vuhez labour en harlu, n'omp ket evit lavarout gwelloc'h eget :

Bennozh Doue dezhañ a wir galon
ha Joa d'an Anaon.

Doujañs da vuhez an dud !

Divizet e oa bet kas disklêriadenn an *Emglev* diwar-benn an doujañs dleet da vuhez an dud d'ar muiañ posubl a gelaouennoù, N'eus bet sevenet nemet ul lodig eus al labour-se.

Bennozh Doue a lavaromp d'ar c'helaouennoù o deus bet embannet an destenn en he fezh : *Barr-Heol, Dihun (breiz), Al Liamm, Liberté du Morbihan*, hag ivez *Ouest-France* en deus bet embannet un diverrañ.

Ar re a garfe kaout skouerennoù eus an destenn-se, goullennet da greizenn Roazhon pe hini Vrest.

Mont da aveliñ e fri

Stajoù e Kastell

Gant an diaesterioù a zo bet war hent ar brezhoneg, eo servijus-bras da veur a hini, dreist-holl d'ar re a zo e chom e kêr, mont da splujañ er brezhoneg diwar ar maez. Posubl eo hen ober o vont da vevañ ur pennad-amzer e tiegezhioù 'zo e Kastell-Paol : lojeiz, bevañs kinniget, hogen labour er parkeier, brezhoneg penn-da-benn an devezhioù arat. Skrivañ da : *Kelc'h brezhonegerien Bro-Leon, Ti-Kêr, 29250 Kastell-Paol*.

Gourc'hemenoù laouen, eürusted ha santelezh da Weltaz ar Fur ha da Variz al Loup a zo bet benniget o euredenn e Kemper d'ar 14 a viz Genver !

Ur breur a zo bet ganet deomp : E-pad pell amzer eo bet *Emglev an Tiegezhioù* ar strollad nemetan o tolpañ kenetrezo tiegezhioù brezhonegerien. Kresket an dud avat : savet ez eus bet ur strollad nevez e Gourin, d'ar 27 a viz Genver : *Ar Brezhoneg er gêr* e anv. Mennet eo da sikour an tiegezhioù brezhonegerien d'en em skoazellañ kenetrezo o lakaat ar vugale da gejañ asamble, o sevel kaieroù, embannadurioù, oc'h eskemm chomlec'hioù, o lakaat war-wel kudenn an tiegezhioù brezhoneg.

Diforc'h eo tachenn-oberiañ *ar Brezhoneg er gêr* diouzh hini E.A.T., peogwir eo neptu e-keñver relijion ar strollad nevez.

Sekretour E.A.T. en deus kemeret perzh e fin bodadenn Gourin. Divizet eo bet e vefe klasket en em glevout evit mirout lakaat emvodoù an daou strollad er memes devezhioù. Emichañs e vo posubl labourat war dachennoù all ivez.

Buhez frouezhus a hetomp d'hor breur nevez-c'hanet !

Mae pe Mezheven : Emvod an Nevez-Amzer.

E miz Eost : pennemvod 1974, en Naoned.

WANIG HA WENIG : kelaouenn ar vugale, ar stourmerien da zont.
Lakait ho pugale da lenn anezhi ha da gas skeudennoù ha skridoù dezhi.

Soaz an Tieg

keginerezh

E meur a zoare e c'heller debriñ avaloù ; ez-kreiz hag ez-poazh int mat ha yoc'hus. Setu penaos e c'heller o foazhat hag ober traoù lipous ganto :

AVALOU GANT RIZ

Lakaat riz da boazhat el laezh war an tan ha sukr ennañ.

Poazhit avaloù goude bezañ o c'hignet hag o drailhnet. Lakait sukr enno hag o c'hemeskit evel yod.

En ur plad da vont er forn, lakait ar riz da gentañ hag an avaloù da c'houde. Basit pevar gwenn-vi ha meskit skañv pep tra. Lakait da boazhat er forn e-pad tri-c'hard- eur. Hogen arabat e vefe re a dan er fornigell pe e vezo suilhnet ho pladad lipouzerezh.

KOUIGN AVALOU GIZ LEON

Kignit daouzek aval ha lammit ar preizenn anezho. O lakait da boazhañ ha da deuziñ zoken, war an tan, gant un tammig kanell. Silit hoc'h avaloù dre un tamouez orjal. Lakait ar yod-avaloù-se en ur gastolodenn war an tan gant ul loaïad bleud patatez, un hanter-lur sukr malet hag un tamm amann. Goude bezañ hel lezet da vitoniñ war an tan, tennit ho yod-avaloù war ur plad da yenañ. Pa vezo yen, e taoloc'h ennañ c'hwec'h vi, a dorroc'h an eil war-lerc'h egile, en ur gemeskiñ gant ur fourchetez. Taolit ho kouignenn en ur moul amanennet. Lakait da boazhañ e-pad un hanter- eur, en dour, moul hag all, ha divoulit war ur plad.

ANVIOU-LEC'H EUS BRO-BLOUVAEL

LANGASTPRE BERTON

Langastpre a zo ur gêriadenn vras eus parrez Plouzal (Plessala), er c'hreisteiz d'ar vourc'h, ul lev pe ul lev hanter. Skrivet e vez an anv-se : Langast-pre pe Langastpre (skritelloñ-hent), ha distaget romaneg ar vro : *langa-preu*. An neb na daolo ket evezh a gompreno "Langast ar prad", da lavarout eo Chapel sant Kast ar Prad. Bez' eus meur a Langast : unan e Tremeur (kanton Bronn, 22) gant ur chapel distrujet, unan all e Merleap (kanton Uzel, 22), hervez Koufon (op. cit.), hogen n'eo meneget e neblec'h ebet, zoken gant Koufon, er rannig gouestlet da Verleag ! Evit Kast, e kaver Sant-Kast (kanton Matignon, 22), neuze c'hoazh Sant-Kast e Gwite (kanton Kaon, 22) ha Kast, ur barrez eus eskopti Kemper. N'ouzer netra diwar-benn sant Kast, evit gwir, nemet marvailhoù saourus, evel istor ar sant o storkañ e droad ouzh ur garreg da reiñ ar furm anezhañ d'e gere d'ober ur re votoñ dezhañ ! Mesket eo bet e vuhez gant hini sant Yegu, a oa e abati tost ouzh Sant-Kast, met didalvoud ez eo istor o buhez dezho o-daou e-keñver Istor. Tennañ a reer e anv eus al latin *Castus*, santel, glan (1).

Er roll emaoamp o paouez reiñ, n'hon eus ket meneget ur barrez eus kanton Plougenav (pe Blouwinaz), Langast, rak anv kozh ha gwirion ar barrez-mañ a oa Langal(l), ha diaes eo gout peur ha perak e oa bet divadezet ha skrivet Langast. Sant Gall avat, a oa, hag a zo chomet patron ar barrez. Gouizieien evel Fañch Gourvil, ha marteze Jozef Loth e-unan, a oa bet lakaet da faziañ en askont d'ar skritur "ofisiel" Langast. Hogen n'eus arvar ebet.

Distroomp avat, d'hol Langast-pre. Ma'z eus bet ur chapel eno, ur wech bennak, ne chom netra e memor ar bobl. Ar chapel nemeti er c'horn-bro, a oa chapel ar Sep, e gwirionez ur chapel graet gant kouldri ar c'hastell a oa eno ! Met diskaret eo pep tra, nemet e oar ar bobl e pelec'h edo ar chapel-se. Un hanter-lev ac'hano, diouzh tu ar c'hreisteiz, war zouar Plouvael, emañ Sant-Sulien(2) ; eno avat, eo bev bepred ar soñj eus ar "vered", aet da liorz bremañ ; war ar voger, ez eus bet lezet ur C'hrist-maen kozh ; hag an ti nesañ, dezhañ ur gaer a fasadenn e mein-benerezh, gant ur c'halir skultet a-us d'ar prenestr, a vez graet ar presbital anezhañ. Ma ! roud ebet, soñj ebet eus chapel ebet ! Ha koulskoude, hep mar na marteze, ez eus bet eno ur chapel ! Souezhus eo pegen aes ec'h ankoua ar bobl !

Etre Langastpre ha Sant-Sulien, ez eus un draoñenn don दौरaet gant ur stêr vihan, ar Fromene (gwazh froud ar menez). Diouzh tu ar sav-heol d'an div gêriadenn, uheloc'h egeto, tre war lein an div dorgenn e tremene an hent kozh roman : Plouvael-Menez-ar-C'hont, evit diskenn d'ar pevarlamm etrezek ar Fromene hag adsevel, berr warnañ, war an tu

all, goude bezañ treuzet "Roudoù ar °Chered" (3).

Ma ! war un dorgenn emañ Langastpre, ha pradebet warni, un uhelgom-pezenn kentoc'h. Setu perak e teu anat ster ar ger *pre* = *bre*, ha netra ken. Ret eo gwelout an dorgenn diouzh tu sant Sulien, evit bezañ a-du-krenn : ar p ne deo nemet kaletadur ar b goude st.

Evit gwir emañ Langast-pre war ur pezh torgenn etre div stêr : ar Fromene pe stêr Pennhoed (= Penn ar C'hoad), diouzh tu ar c'hreisteiz, hag al Leri, diouzh tu an hanternoz.

An anv Bre a adkaver en tu all da stêr al Leri dindan ur stumm gallek ha Hautière, 'lec'h ma'z eus ur chapel gouestlet d'ar Werc'hez, hag a zo ar penn c'hwec'hkognek anezhi eus an XVIIvet kantved. Daoust eo chapel ar Sep hag ar chapel-mañ o dije sikouret disofjal chapel Langastpre (4), evit ma'z eus bet ur chapel eno ur wech bennak ?

Met peseurt anv en devoa evit gwir ar Bre-se ? Lesanvet eo stêr al *Rivière du Berton*, da lavarout eo Stêr ar Breton, hag an hent breizhich a ya eus Roudouze-Jouan da Sant-Gouenoù ha Koedlinez *Le Chemin du Berton*, da lavarout eo Hent ar Breton. Ha da zisklêriañ eo daou lesanv-se, e leverer ez eo dre an hent-mañ ez ae ar Vretoned (kompren : ar vrezhonegerion) da bardon sant Matilin Menez-ar-C'hont. Me 'zo mat din kredif an dra-se. Koulskoude, n'eo ket hennet an hent berrañ ; met d'ur mare a zo bet, marteze, e oa aet ken fall an hent kozh roman ma oa ranket hen dilezel evit c'hoari an dro dre Sant-Gouenoù e-lec'h troc'hañ berr-ha-berr dre vourc'h Plouzal (Plessala). Iskis eo evelkent kaout an hevelep lesanv d'an hent (lakomp !) ha d'ar stêr. Iskis eo gwelout an unander "ar Breton" e-lec'h al liester "ar Vretoned". Ha neuze, daoust hag e oa kalz gwelloc'h an hent-se "Hent ar Breton" eget an hentoù all ? Hag eñ war ribl ur stêr pradoù gleb, ha setu perak e kav dimp ez eo kalz koshoc'h ar ger Berton-se ha kalz aesoc'h da zisklêriañ eget na seblant ! Hag hep chom da dortal, e lavaromp ez eo anv (pe lesanv) torgenn Langastpre = Berton, da lavarout eo Bre-ton, hemañ distaget Beurton (evel e romaneg), evel ma kaver Beurleudi ha Berlawene(z) evit Brelidi ha Brelevenez.

E kement ha ma ouzon, ez eo hañval torgenn Langast-pre ouzh ur fri torret pe dogn ! Neuze Bre-togn. An hent kozh a dreuze stêr al Leri e Roudouze-Raouled. Ac'hano eo o deus tapet ar stêr hag an hent lesanv ar *Rho* stok enno : Hent ar Bre-togn, stêr ar Bre-togn.

Tu a vefe da vont pelloc'h zoken, ha kompren Bre-tron, aet da v-Bre-ton, dre fatadur an r e tron, ha tostaat ar ger neuze ouzh ar Bre-trwyn (Troon, e saozneg) a gaver e *Canu Taliesin* (XI, 18) = *bre-fri*. Hep dielloù avat, ez eo diaes mont keit-se.

Hogen anvioù evel Bre, Fromene, Leri, Pennhoed, h.a., a ziskouez pegen berrboellik ha pegen diziaze ez eo tezenn poadred an U.D.B., pa fell dezho rannañ Breizh e div lodenn : an tu "gallo" a-viskoazh, hag an tu brezhonek ! N'eo ket ken eeun-se an traoù, ha me, evel Breizhuheliad, gant va gwizioù don-meurbet e Bro-Blouvael hag e

Porc'hoed, (anvioù gallek keta ?), a rank sevel ma mouezh gant nerzh a-enep d'ar seurt kredenn, ha sur-mat, mar he defe gouiziegezh a-walc'h, e vefe a-du ganin ar vaouez kozh-se eus Sant-Sulien Plouvael (75 vloaz) a zistage ken brav *Fromeune*, gant ur bouez-mouezh kreñv war ar silabenn gentañ - tra ma lavare he merc'h, en ur feson ken plat ha ma oa-hi ront ha tev : *Fromme*, gant ar bouez-mouezh war ar silabenn diwezhañ (5).

Langast-pre = Langast ar Menez-Friek. Mar ne gredit ket, kit da welout.

25.4.74.

Notennoù.

- 1 J. Loth a ra meneg eus *Llangasty*, e Kembre (Loth, N.S. 191).
- 2 Gwel. *Barr-Heol*, niv. 80 : Orin parrez Plouvael.
- 3 Gwech pe wech, e tistroimp war an anv-se a zo ennañ, d'hor meno, ar ger *red* = roudouz. An anv-se a gaver e lec'h all ivez evit "roudouziou".
- 4 Tu a vefe marteze da gompren *Langast* en ur mod all, met n'eo ket war se emañ hon diviz en dro-mañ, pa glaskomp hepken disklêriañ ar ger *pre*.
- 5 Meur a wech em boa graet d'an div vaouez distagañ an anv-se, hep lavarout dezho perak. A-benn ar fin, em boa graet dezho merzhout e tistagant e daou stumm disheñvel-tre. Ma oa bet chomet e Breizh-Uhel un enezennad vrezhonegerien un tu bennak war-lerc'h ar sitreadoù all, e klaskfen-me e Sant-Sulien-Langastpre hag er c'hornad-bro-se a vez graet bepred anezhañ : Bro ar Menez.

Notenn. Chapel Sant-Sulien a oa en he sav c'hoazh e 1862, hervez Kannadig-parrez Plouvael (Mae 1974), ar pezh a laka anat pegen berr ez eo memor ar bobl.

NEVEZ DEUET ER-MAEZ.

Levr ar *Salmou*, gant an Aotrou P. Gall, person Eviaz (Yvias - 22). Advouladur. A-benn bremañ eo troet eta en e bezh ar Bibl hebraek. Goulenn al levrioù digant an Ao. Gall.

An *Oferenn interamant hag oferennou an Anaon*. Priz : 10 Lur hep ken a vizoù. *Studi hag Ober*, K.R.P. 42 546. Gwelloc'h e vije bet marteze reiñ un titl all d'ar c'haierou-mañ eus *Studi hag Ober* ; lakomp *Ofis an Anaon*, peogwir e kaver pep tra e gwirionez, evit an Interamantou hag oferinier an Anaon, hag an Deiz-ha-Bloazioù, Gouel an Anaon, Lennadennoù, Prefasoù, hag Orezoù niverus da zibab. Un toullad brav a donioù da heul *Salmou*, hag ivez Antifonenoù gant ar muzik. Mat e vefe evit unan eus ar Prefasoù, da vihanañ, skrivañ an notennoù. Dambrest e teuy an eil Levr o sellout dreist-holl ouzh *Pedennoù* evit an Anaon (ar Grasoù, evel ma veze lavaret !).

Loeiz Herriou : *Kammadro en Ankeù*, eñvorennoù-brezel ar gwenedour meur. Priz al levr : 45.00. Skrivañ d'an Aotrou M. Henrio, K.R.P. 16 17 66 Naoned.

Herve Lanndiern

Bed gwirion ar yezhoù

En e levr brudet war istor ar "Yezhoù komzet", skrivet pemp bloaz warn-ugent bennak 'zo, e roe ar yezhour Mario Pei roll an trizek yezh komzet, d'ar mare-se, gant hanter-kant milion a dud, da nebeutañ, da lavarout eo, hervez an niver anezho : ar Sinaeg, ar Saozneg, an Hindoustaneg, ar Rusianeg, ar Spagnoleg, ar Germaneg, ar Japaneg, ar Galleg, ar Malezieg, ar Bengali, ar Portugaleg, an Italianeg, an Arabeg. Ar Galleg, evel ma weler, a oa, d'ar mare-se, er seizhvet renk.

N'eus ket ezhomm da lavarout penaos, gant kresk spontus ar boblañs dro ar bed, dreist-holl er broioù nevez, abaoe an amzer-se, e vefe er roll-se un ugent bennak a anvioù da nebeutañ. Ouzhpenn, evit peza a sell ouzh ar renk, e kav din ez eo mont en tu-hont d'ar wirionez lakaat ar Sinaeg da gentañ.

Ar Sinaeg ? Ur sorc'henn nemetken. N'eus ket ur yezh sinaek ; bez' ez eus, da nebeutañ, div, ha zoken un ugent bennak, darn anezho ken disheñvel an eil diouzh eben ha ma'z eo ar Saozneg diouzh ar Germaneg. Etre Hanternoziz ha Kreisteziz, n'eus tu ebet d'en em gompren. Al liamm nemetañ etrezo ez eo ar skritur unvan a vez graet anezhañ skritur arouezluniek pe ideografikel, a c'hell bezañ intentet gant an holl Sinaiz ; met er stumm-se, kement yezh 'zo tout, zoken ur yezh estren a-grenn d'ar Sinaeg, dre ober gant an hevelep arouezioù, a c'hellfed reiñ dezhi an anv a "Sinaeg" ! Yezhourien 'zo o deus soñjet krouiñ ur yezh etrevroadel evel-se, rak, anat deoc'h, ma rit skeudenn ur wezenn, pe un aval, pe ur pesk, e viot intentet, sañset, eus an eil penn d'egile d'hor planedenn...

Met distroomp d'hor roll, goude bezañ lakaat ar "sinaegoù" disheñvel en o gwir blas hag a zo c'hoazh enorus-tre, ha goude bezañ rentet d'ar Saozneg ar renk kentañ a zo dleet dezhañ, hep mar na marteze.

Mar lakomp keñver-ha-keñver an trizek yezh meneget ganimp - kuit a gomz eus ar re all - e welomp emañ ar Galleg en daouzekvet renk hepmuiken, gant an Italianeg nemetken war e lerc'h.

Dalc'het en deus ar Saozneg da lañsañ, hep tamm dilerc'h ebet. Yezh c'henidik tri c'hant milion a dud : Breizh-Veur, Amerika an Hanternoz, tud wenn ar "Commonwealth". Bez' ez eo, dre ret, yezh an darempredoù evit Azia a-bezh, an hanter eus Afrika, hag e teu tamm-ha-tamm da vezañ sellet evel yezh etrevroadel, tonket dezhi c'hoari etre tud ar bloaz 2 000, roll al latin en Europa ar Grennamzer hag an Azpinivelezh, - a-ziavaez d'an Douar-bras Soviedel e-lec'h ma talc'h ar Rusianeg d'ober e renkoù ha d'en em ledañ mui-ouzh-mui.

Daoust da youl Nevez-Sina d'ober gant ar yezh vandiniek yezh ur bobl diniver a dud, daoust m'o deus kaset al labour war-raok gant un tizh sebezus, n'eo ket diouzhtu, na sur-mat e-kerz hor remziad-ni, e vo gwelet ar frouezh eus ar strivadeg-se.

Evit pezh a sell ouzh ar yezhoù all o sevel : Spagnoleg, Portugaleg, Arabeg, uhelañ pal a c'hellont c'hoantaat tizhout eo chom pe dont da vezañ yezhoù bras "rannvedel", yezhoù ur rann bras pe vrasoc'h eus ar bed, met e stumm ebet, gwir yezhoù etrevroadel pe hollvedel.

E gwirionez, kemeret eo ar plas abaoe pell 'zo ! Ha war an tamm douar patatez-mañ, deuet da vezañ ken bihan hag un aval-orañjez evit pezh a sell ouzh an darempredoù etre ar pobloù, pa'z eo bet ar pell-derioù n'eo ket berraet, met kaset da get, ne c'hell mui bezañ war dachenn an eskemmoù bras etrevroadel, meur a yezh o kevezañ ; hag ar Rusianed o-unan, pa zeuint er-maez eus o "goañvezh", a ranko an zav ar wirionez-se, sklaer evel lagad un naer !

Chom a ray ar Germaneg ur yezh vras kaer, an hini gentañ e-keñver niver, en Europa ar C'hornog, met echu 'zo gant e roll etrevroadel ; dre holl, koulz lavarout, en Europa ar Retér pe an Hanternoz, e deus ar Saozneg pe ar Rusianeg kemeret e lec'h.

Ar galleg n'eo komzet gant un tolpad bras a dud e nep lec'h ebet, nemet e diabarzh ar "C'hwec'hkogneg". E lec'h all, ez eo bresek ha diasur e blas, daoust d'ar stourm pennek hag aheurtet kaset en-dre gant ur spered-aotronekaat.

Evit pezh a sell ouzh Japaniz, Indeziz, Bengaliz, Maleziz, ez eo e Saozneg eo e komzont ouzh ar bed.

Perak ar prederiadennoù-mañ ? Dre ma ranko an holl Gelted, ha dreist-holl ar Vretoned, derc'hel kont eus ar gwirionezioù-se evit aozañ hag urzhiañ ar stourm evit difenn o sevenadurioù.

N'eus tu ebet da Gembreiz na da Iwerzhoniz da argas kuit a-grenn ar Saozneg eus o frogrammoù ; ar yezh-mañ, deuet da vezañ yezh ar bed-holl, a zalc'ho, e stumm pe stumm, da vevañ keñver-ha-keñver gant o yezhoù broadel. E stumm pe stumm, ez eo galvet ar broioù-se da vezañ divyezhek, en amzer-da-zont, keltiek-ha-saozneg. Ha choazh e ranker en em glevout war ar ger "divyezhegezh", implijet a-dreuz hag a-hed, ha degas da soñj petra eo ar gwir zivyezhegezh. An divyezhegezh "fifty-fifty" - hanter-ouzh-hanter, mar kirit - a zo un dra enep-natur, a-enep an natur bet krouet gant Doue da gomz ur yezh hepken. Hag ar pezh a lavaromp diwar-benn ar Gelted Tramor, daoust ha ne vo ket gwir ivez, un deiz, evit holl dud an douar ragenep d'ar Saozneg, ar yezh trec'h ?

Mar deo ret da bep den, ha da bep Kelt gant se, gouzout ervat ar Saozneg, dre ma'z eo an dud sitoianed - keodediz - ar bed a-bezh, ez eo ken ret all da beb unan anaout e yezh vroadel, kalz gwelloc'h c'hoazh eget ar yezh etrevroadel, ma chomo yezh e galon hag e spered.

Dre un darvoud istorel, ha n'eo ket tamm ebet dre ma oa gwelloc'h dre natur eget yezh all ebet, ez eo deuet ar Saozneg da vezañ yezh an darempredoù evit holl vroioù ar bed, ha yezh hor sevenadur teknikel, ha setu perak e lavaran krak-ha-berr penaos, en desped d'he stad

reuzedik, en amzer o ren, a yezh trec'h et, gwallgaset, disprizet, ez eo ar brezhoneg ar yezh a zo d'he heul an esperañs kaerañ da adsevel, pa'z eus e-tal he dor, hed-ha-hed hec'h aodeier, neket un enebour, neket ur riskl, met danvez ur skoazellour, en he stourmad evit he buhez ouzh ar vorgazhenn he moug hag he gwask a bep tu. Ar Saozneg hag a anavezomp mui-ouzh-mui a zo evidomp an nor war-zu an donvor, skouarn ar bed-holl, hag a ro dimp, a-barzh ar fin, an tu d'ober ur choaz ha d'en em zieubiñ.

Evezhiadenn. Ur gwall-gudenn ez eo kudenn an divyezhegezh, zoken gant ar Saozneg da eil yezh ; setu perak e harfemp kaout alioù hol-lemmerien. Ar Penerezh.

KENDALC'H ETREKELTIEK. - E Naoned, e vo lidet ar C'hendalc'h, eus an 13 d'an 18 a viz Eost 1974. Danvez ar studiadennoù hag ar prezegennoù : gwirioù sevenadurel ar Broioù. Skrivañ d'an Ao. Pêr Denez, kevrenn ar Studioù keltiek, Skol-Veur Breizh-Uhel, Villejean, 35000 Roazhon, pe d'ar sekretourva : Château des Ducs (Kastell an Duged) 44000 Nantes-Naoned.

RADIO-BREIZH. - 1 - C'hoariet eo bet war Radio-Breizh, d'ar 4 ha d'ar 5 a viz Mae, gant Charlez ha Chanig ar Gall, pezh-c'hoari hor c'henlabourer, Loeiz Andouard : *Un Deiz Gouel*, embannet war niverenn 80 *Barr-Heol*.

2 - Abaoe ma oa bet dilostet e c'halvadenn evit sikour prizonidi an F.L.B. ha m'en devoa roet e zilez, n'eo ket bet gwelet, na klevet Charlez ar Gall er Skinwel, da lavarout eo abaoe miz C'hwevrer diwezhañ.

3 - Unton a-walc'h ez eo emweladennoù F. Broudig gant parrezioù Breizh-Izel ; ha diglok a-lies dre ma vank ali ar bersoned : arabat disañjal ez eo ar person en e barrez unan eus ar re a anavez ar gwellañ anezhi, hag ivez an hini nemetañ peurvuiañ o vezañ bet studiet ar yezh ha barrek d'he c'homz gwelloc'h eget n'eus forzh pehini eus e barrezianiz, anezho trefodacherien, siwazh !

4 - Adsavet eo pilier Roc'h-Tredudon hag adkrog neuze ar Skinwel gall gant e labour drastus.

MOUEZHIADDEGOU. - D'ar 5 ha d'an 19 a viz Mae, ez eus bet votet evit choaz ur Prezidant ar Republik nevez, goude ma oa marvet ar Prezidant kozh, Jord Pompidou. Daou a oa chomet war ar renk 'benn an eil tro, diwar an daouzek a oa en dro gentañ : F. Mitterand, socialist, ha Jiskard d'Estagn, kreizennour. An Aotroù Jiskard d'Estagn a zo bet anvet.

Ar federalourien : Gi Héraud ha J.M. Sebag o doa bet un niver dister a vouezhoù. Pe vez mouezhiadegoù bras, e vot an dud evit an danvez-kannaded pennañ. Hag en dra-mañ, e Breizh, edg holl strolladoù an Emsav : an U.D.B. (Unvaniezh Demokratel Breizh) ha S.A.V. (Strollad ar Vro) a-du gant an danvez-prezidant socialist : F. Mitterand. Moullet he doa an U.D.B. (hag a zo socialist) skritelloù en div yezh, gallek ha brezhonek :

Breizh socialist !

Al labourerien a voto Mitterand.

S.A.V. diouzh e du en devoa sinet un emglev gant F. Mitterand, e nav foent, dre hanterou-riezh I. Penseg, depute socialist Kemperle.

An Aotroù Dumont, aet war ar renk evit difenn an ekologiezh (an amgêlc'hiad) en devoa distag an tuallad frazennoù en okitaneg, en elzasaneg hag e brezhoneg. Lennet en devoa un nebeut gwerzennoù tennet eus levr Anjela Duval : *Kan an Douar*.

Plède evit ur Brezhoneg brezhonek

A-ratozh-kaer, e tibabomp an titl hon eus lakaet e penn ar studiadenn-mañ gant ar spi e-tro trouz ! Ha c'hoazh ne c'hellomp ket lavarout kement tra a vefe da lavarout, rak ur bern doou-erioù a vefe ret lakaat da heul hor burutelladennoù, peadra da gargañ un niverenn a-bezh eus Barr-Heol.

Anat eo emañ ar yezh o vreinañ eus an diavaez hag eus an dibarzh. Eus an diavaez : en deiz-se da levezon ar vuhez nevez hag ar binvioù-kelaouiñ bras. Met eus an dibarzh ivez, rak mat gout a ouie ervat e yezh ha brezhoneg-brezhonek e oa ar yezh a skriva. Pec'hed eo e oa bet levezonet re gant Jozef Loth, betek re. Met se 'zo un afer all ha Jozef Loth, forzh penaos, a oa ur gouizieg meur...

Gwech ha gwech all ez eus bet tabut evit gout peseurt yezh a zo e gwirionez brezhoneg mat ha brezhoneg fall. Er-maez eus luziatez ar rannyezhoù komzet, e fell dimp lakaat ar gudenn-se avat !

A-raok ar brezel 1939-45, setu ar pezh a lennomp dindan bluenn daou skrivagner eus Bro-Wened : Loeiz Herriou hag Iwan an Diberder. Evit Loeiz Herriou, arvar ebet e-keñver ar yezh : gout a ouie ervat e yezh ha brezhoneg-brezhonek e oa ar yezh a skriva. Pec'hed eo e oa bet levezonet re gant Jozef Loth, betek re. Met se 'zo un afer all ha Jozef Loth, forzh penaos, a oa ur gouizieg meur...

Setu ar pezh a skriva Loeiz Herriou, e *Dihunamb*, miz Eost 1933 : *Brezhoneg ha brezhoneg a zo*. E brezhoneg peurunvan, e lakomp, na petra 'ta, an arroudoù diwar e bennad.

«Biskoazh, moarvat, nend eo bet skrivet kement ar brezhoneg, evel hiziv an deiz... Ha mat pe fall eo kement-se ? Mat eo, a-dra-sur, mar dle kement-se gwellaat stad ar brezhoneg hag her c'haeraat evel yezh lennegel ha, war un dro, evel yezh vev. Fall eo, mar dle kement-se kousi ar brezhoneg ha lemel gantañ ar pezh a ra dezhañ bout dishañval diouzh ar galleg ha diouzh kement yezh a zo... Rak, diouzh an tu-se, emañ an dalc'h evidomp-ni, Breizhiz, hag aze eo en o deus d'en em zivall ar muiañ ar skrivagnerien yaouank. Ret eo ma'z eveshaint, en deiz ma kemerint ar bluenn da skrivañ e brezhoneg, emañ e galleg en o deus graet o studi, emañ e galleg en o deus desket soñjal ha kompren, emañ e galleg e komzont a-dro ar bloaz pe 'gozik, emañ e galleg e lennont ar muiañ... Ur burzhud e vefe enta gwelet spered hon tud yaouank o chomel hep bout livet, gant an troc'had-se a laker warnezhañ adal ma c'hellont komz, lod-kaer anezhe. Ha pen da c'hoant dezhe diwezhatoc'h da skrivañ e brezhoneg, emañ e galleg e reont o soñjoù, en desped dezhe. Ha kement a aon o deus ma vefe kredet nen deo ket brezhoneg eo a skrivont, ma pellaont kentizh ar gerioù a zeu en o soñj hag e seblant dezho bout galleg. Neuze e klaskont ur geriadur hag e sailhont gant jourdoul war ar ger «moulet», daoust na vefe ket anavezet. Petra vern, adal nen deo ket gallek. Filimet e ver d'ar gerioù, a laran deoc'h, gant ar gudenn — ha nen deo gwir met a hanter — emañ enne emañ braventez ar yezh. Evel-se e kred ur c'hrouadur e teuy da benn a ober un daolenn gaer p'en devo e vamm prenet dezhañ ur voestad liv.»

Ret e vefe adskrivañ penn-da-benn pennad Loeiz Herriou, rak talvezout a ra ar boan, e gwirionez. Adskrivomp hepken kement-mañ : «Petra 'lavarfec'h-c'hwi ag un den yaouank, aet a c'houde daou pe tri bloaz war ar germaneg, studiet dezhañ hepken el levrioù hag a gradfe e vefe tre d'ober pennoberioù e germaneg ? »

Evit Loeiz Herriou, emañ «braventez ha pinvidigezh ar yezh... ar brezhoneg bev a gomzer e pep korn-bro a Vreizh... (ennañ) e kaver mammenn ar parlant flour, an troiennoù aes ha bokedet... hag er skrivagnerion o deus diazezet o skridoù war ar brezhoneg bev».

E niverenn 267 eus *Dihunamb*, Gwengolo 1933, e roe neuze Loeiz Herriou skouerioù eus ar pezh a felle dezhañ lavarout.

Daou-ugent vloaz 'zo eo bet skrivet ar c'homzoù-se ha, daoust d'ar bed da vezañ bet kemmet spontus ha daoust ma'z eus bet savet ez-homm nevez e-keñver ar yezh hec'h-unan, ne c'heller ket bezañ a-enep da gomzoù fur evel-se.

Goude Loeiz Herriou, gwelomp petra a lavare e genlabourer Iwan an Diberder. Ganet e oa bet an Diberder en Oriant, ha ranket en doa deskiñ ar yezh. Un den eus ar gouziekañ, ur skrivagner flour e galleg, met ivez lemm e latenn, kement ha ken bihan ma oa bet lesanvet «*An diaoul ag an Oriant*». Krennet e oa bet e zivaskell dezhañ gant ar brezel 1914 ha kouezhet e oa e gelaouenn savet gantañ, *Brittia*. Ampart e oa war lennegezh Vreizh, studiet en devoa kembraeg ha gouezeleg (hini Bro-Skos da vihanañ). Ma ! biskoazh e gwirionez ne oa deuet e-benn da vestroniañ ar yezh komzet. Strobot e chome alies, ha gwelloc'h e veze gantañ treiñ war ar galleg. Ar pezh ne harze ket outañ da c'houzout petra 'oa ar gwir vrezhoneg hag ar gwir lennegezh. Setu eta ar pezh a skriva e *niv. 288 Dihunamb* (ur fazi a zo evit ar miz, merket *miz gourhelén e-lec'h méheúén*) : «Skriüamb é brehoneg Breih».

«Rezon en deus Loeiz Herriou a pa lar d'ar skrivagnerion yaouank diwall a skrivañ ur brezhoneg gallekaet. Met ar pezh ne gomprenan ket a zo penaos emañ e-touezh ar re zesketañ e kaver ar si-se muiañ. Ha c'hwi a fazife pa gredfec'h emañ re a studi en deus o lakaet da faziñ. Pet gwech emaint bet gourdrouzet d'o mistri en arbenn ma ne oant ket evit tapout stumm-skrid al latin pe hini ar /saozneg/ ? Pet gwech o deus gwelet ar mestr kelenour o skrivañ war vevenn o fajenn latin : «Troiennoù gallek a zo ganeoc'h».

Diouzhtu e welit ton ar pennad-skrid. Hag evel just, e komz eus «kleñved ar geriadurioù» gant un taol pav da Fañch Vallée, dre ma kaver en e c'heriadur anvioù loened gouez eus ar broioù pellañ, tra ne gaver ket geriennoù boutin evel *annoer* (annoar), *spalouer* (sparfell), h.a. «*Rak ar re o deus heri savet, emezañ, o deus hen savet en o c'hador !*». E gwirionez, e oa bet disoñjet meur a c'her gant Vallée en e c'heriadur, met dre faot e fichenoù, aozet fall, pe gollet !

Met dindan an holl abegadennoù-se, e oa ur stumm-spered hag ivez rakvarnioù diwar-benn tachenn-implij ar yezh. Sellit petra a skriva Loeiz Herriou e-unan diwar-benn levr Jakez Riou *Geotenn ar Werc'hez*. Re nevez e oa stumm-skrivañ J. Riou evit bezañ diouzh grad Loeiz Herriou (*Dihunamb*, niv. 284, miz Huavrér 1935), dre ma kave re sec'h yezh an oborour ha troiennoù gallek e-barzh, daoust ma veule al levr a-hend-all.

*

Hep mar ebet e oa ur spered nevez o tont e-touez ar skrivagnerien ha na skrivent ket mui diwar-benn an hevelep traoù hag ar re gozh, nag er memes stumm.

War niverenn 70 *Gwalarn*, Gwengolo 1934, ez eus ur pennad a dalvoudegezh uhel gant R. Hemon, an *Den hag ar Yezh*, o lakaat war he rez kudenn ar yezh pobl hag ar yezh lennegel, pennad o kregiñ gant ar gerioù sec'h-mañ : «*Ne skuizhin biken o lavarout pebezh fazi a raer pa soñjer ez eo ar yezh wellañ yezh ar bobl, yezh an dud distoer...*», hag oc'h echuiñ dre an estlammadenn-mañ : «*Na pebezh fankigell eo Breizh ! Na pebezh kemmesk a venozioù gwir ha faos e speredoù ar-re wellañ eus ar Vretoned ! Penaos lakaat an dud da gompren e c'heller karout yezh ar bobl, mont da glask e yezh ar bobl kement a zo yac'h ha kreñv, hep skrivañ evit se yezh ar bobl, pa saver ur bazenn uheloc'h eget ar marvailhoù farsus hag ar rimadelloù...*».

Un tamm bec'h a voe etre R. Hemon ha Z. Langleiz en abeg d'ar pennad-se (*Gwalarn*, 73, Kerzu 1934, ha 75, C'hwevrer 1935). Z. Langleiz o lavarout evit e rezon e oa tu da skrivañ e yezh ar bobl, zoken diwar-benn traoù uhel, evel m'edo oc'h ober gant e levr diwar-benn an Arz.

Gant ledanaat komzoù Dir-na-Dor, en e gentskrid da levr Paotr Juluen, an *Tornado*, (1935), ez eus tu, a gav dimp, da lakaat an traoù war o rez :

« Brezhoneg bev, graet gantañ e gresk dre c'halloud ur skrivagner hag en deus graet e gantañ studi war varlenn ur Vretonez hag an eil ouzh taol ar ouiziegezh ». Ar pezh a c'hellfed lavarout evel-hen : « skrivagnerien beuzet er yezh hag o skrivañ oberennoù hervez ijin ar yezh naturel-se ».

Un nebeut bloavezhioù 'zo avat, ez eus en em gavet daou zarvoud a-bouez-vras, stag tamm-pe-damm an eil ouzh egile, hag o deus degaset ar Reveulzi war dachenn ar yezh : embannidigezh *Geriadur ar Brezhoneg kozh*, gant L. Fleuriot, kelenner e Skol-Veur Roazhon (1964) ha savidigezh ar c'hevredad S.A.D.E.D. (Strollad an deskadurezh eil derez) gant e venozioù war ar sturvezhouriezh, e-giz ma leveront, ha neuze ar skourr dichonket diwar gef S.A.D.E.D. *Imbourc'h* ha *Skol an Emsav*.

Hag hon tud da besketa e geriadur L. Fleuriot ha da reolennañ ar yezh. Gallout a reer en em c'houlenn avat, perak o deus gortozet ken na vije embannet geriadur ar brezhoneg kozh (an Henvezhoneg), gant an Ao. Fleuriot, kent adkemerout ar gerioù kollet ! N'o devoa nemet studiañ *Canu Aneirin* hag o devije kavet ur vengleuz, pe c'hoazh *Canu Taliesin*, labour ar barzh brudet-se a leverer e vije bet deuet da Vreizh, da Ruiz, ur pennad da heul Sant Weltaz, er c'hwec'hvet kantved. Ar re-se a skrive brezhoneg, hep ger saoznek ebet, na ger... gallek ebet ! Daoust ha ret e vo adkemerout distagadur *th* ha *dd* ivez ?

Ha setu pintet ar Geriadur (n'eo ket hini an Ao. Fleuriot eo a fell dimp lavarout !) evel un Doue war un Tron, hag e-skeud-se ankouaet gwir ijin ar yezh. N'eo ket ni a yelo da zisklêriañ n'eus ket ezhomm da sevel ur Geriadur Nevez o pourchas ar gerioù modern d'hor yezh. Met arabat lezel da dremen fazioù anat a-enep da anien ar yezh, betek skrivañ (ur skouer etre mil) *ur milion den e-lec'h ur million a dud*, evel pa vefe ar ger *milion* ur sifr ha n'eo ket un anv. Kement-se a zo ober goap ouzh skrivagnerien yaouank - darn anezho ampart-meurbet - ha mirout outo da vestroniañ ar yezh evel m'o deus ar gwir d'hen ober. Mat e vefe derc'hel kont gwelloc'h eus Evezhiadennoù fur F. Kervella, embannet war *Al Liamm*.

Ha neuze, forzh pegen sammus ez eo al labour, ne zlefe pennskrivagner ebet lezel da dremen traoù ha ne dint ket brezhoneg-brezhonek, war e gelaouenn. Ha mar bez ret dezhañ sevel urstrollad burutellerien pe reizherien da bleidiñ gant al labour-se, emañ e zlead hen ober. Er stumm-se hepken e vo gallet lakaat urzh ha mirout hor yezh en he splannder evit he zremen d'ar rummadoù da-zont.

Ernest ar Barzhig

Piekuch⁽¹⁾ ar Genaoueg

Kontadenn eus Bro-C'halisia (Kreiz Europa)

War vord ur stêr leun a besked, e oa o chom ur c'hoziad hag e dri mab. An daou henañ, dereat e pep keñver ha poellek, a oa dimezet. An drivet avat a oa re c'henaouek evit kavout ur barez, lakaet ma oa bet dezhañ e skiant e-lec'h ma vez ar vi gant ar yar. Lesanvet e oa bet Piekuch, pezh a dalvez, e yezh ar vro, kement ha "gorer tañ", dre ma veze ar peurvuiañ en-dro d'ar fornigell, pe zoken gouezet warni.

Pa velas ar paotr kozh e koazhe e nerzh hag e oa erru echu dezhañ, e vannas e beadra, an ti hag ar pezh a oa en-dro, etre an daou baotr henañ, gant ma rafent war-dro o faourkaezh breur. Reñf a reas neuze da hep hini anezhe o-zri pep a yalc'had a dri c'hant florin ar-c'hant.

Pa voe marv an tad, e voe graet an traoù evel 'zo dleet, hep ankouaet ar pred goude an obidoù. E-pad un toullad mizioù, e pledas an daou henañ gant o douar, met, un devezh, setu int o lavarout d'an inosant :

"Selaou, mab, ro dimp da arc'hant. Ni a ya da vale bro ha d'ober kenwerzh evit kreskiñ ar bern. Ma teu an taol da vat ganimp, e vo degaset dit ur boned ruz, ur gouriz ruz hag heuzoù ruz. Chom te amañ ha gra tout ar pezh a c'hourc'hemenno dit da c'hoarezed-kaer".

Sorc'hennet evel ma oa Piekuch gant ur boned, ur gouriz hag heuzoù ruz, e roas e yalc'had en he fezh hep termal. Hag an daou all da vont da c'haloupat a-dreuz ar bed.

Paotr-ar-gêr, ma oa loukez, a oa ivez lezirek spontus ; tremen a rae e amzer kropet war ar fornigell d'hor poan o doa an div blac'h da lakaat anezhañ da blêal gant un dra bennak. Plijout a rae dezhañ avat debrif kignen ha bara lin hag evañ sistr, neuze e veze en e vleud.

"Hep ! Piekuch, a huchas un deiz unan eus e ziv c'hoar-gaer dezhañ, sav alese da gerc'hat dour din."

Se a oa e-kreiz ar goañv. Yen spontus an amzer... Ne felle ket d'al luduenn diskenn diwar e fornigell :

"Kae te, mar 't eus c'hoant, me n'hellan ket mont. - Mardouen, genaoueg, te a yelo pe a ray kof moan, hast buan ma fell dit kaout kignen, bara lin ha sistr. Ma ne sentez ket, n'az po na boued nag ar bravigoù ruz a dle ar wazed degas dit".

Ma feiz, neuze e tiskennas Piekuch gant diegi diwar e fornigell.
Kemer a reas ar c'helornioù hag ur vouc'hal, hag eñ betek ar stêr.
Torret gantañ ar skorn, e stouas a-rez an toull e-lec'h ma welas
ur beked. Tapout a reas krog ennañ a-rez e ziskouarn.

"O ! laosk ma zamm buhez ganin, eme ar pesk, me a roio dit holl ar
pezh a fello ganit.

- Hola 'vat ! Kinnig din neuze un dra bennak diouzhtu.

- Ar pezh az po c'hoant a vo roet dit war an taol, adalek m'az po
lavaret :

Diwar urzh ar beked,
Ra zeuio din dres
Ar pezh a c'houlennan :
Kignen, sistr ha bara lin
A dle bezañ servijet din".

Ne oa ket e gomz peurlavaret ma oa pep tra endev war ar skorn,
meuzioù evel ar sistr ; Piekuch a zalc'he krog bepred er pesk.

"Diouz ar c'hentañ ! Daoust ha derc'hel a ray an traoù da vont
evel-se ?

- Ya, ya, keit ha ma vevi, mab."

Adtaolet ar beked gantañ en toull, e teuas soñj d'ar paotr e oa
deut da gerc'hat dour, hag en ur sellout ouzh an div sailh :

"Diwar urzh ar beked,
Ra zeuio din dres
Ar pezh a c'houlennan :
Kelornioù, poent eo dimp,
Distroit hoc'h-unan d'an ti".

Setu ar re-mañ, leun a zour, o vont war o fouez, evel gwazi fur,
dirak Piekuch ha n'en doa netra d'ober nemet krignañ bara lin.
Adalek ma voent aet d'o flasoù, ar paour kaezh papelod a yeas d'e
hini war ar fornigell hag a vanas sorennet. Met prestik e voe
adarre an div all en-dro dezhañ :

"Hep ! Piekuch, kae da derriñ koad..."

- Petra ? Kroc'hen mil ma reoù, me 'zo estonet ganeoc'h, ne doc'h-
c'hwi mat da vann neuze ?

- Peseurt ? Se n'eo ket memes tra ul labour evit ar merc'hed, nag
ez eo. Ret eo moarvat reiñ peadra d'ar fornigell da dommañ da foñs
dit ; hast buan pe n'az po na boued na foeltision seurt all ebed".

Setu neuze ar pezh didalvez, kuit a fiñval, o rannañ kement-mañ
etre e zent :

"Diwar urzh ar beked,
Ra zeuio din dres
Ar pezh a c'houlennan :
Bouc'hal, degas din diouzhtu
Ar c'hoad a zo ezhomm."

Biskoazh kement all ! Ar benveg o vont, o faoutiñ hag o troc'hañ,
hag o tistreiñ gant div vriad a glozas er c'hased, e-pad ma oa ar
paotr rividik war e fornigell o sachañ war e sistr evit kas ar
c'hignen hag ar bara lin war-draoñ.

Met an deiz war-lerc'h, an div berseval o lavarout dezhañ :

"Hep ! breur-kaer, n'eus tamm koad ebet ken war vete nebeut er
c'hraou ; ret e vo dit mont betek ar forest ha plêal gant se. Buan,
paotr, pe n'az po ket da voned ruz nag an traoù all kennebeut".

Ar wech-mañ, ne voe ket ret adpediñ Piekuch, rak c'hoant en doa da
vont da vragal dirak an dud diwar-dro. Ma reas ul lamm diwar e dron
evit mont da sachañ an dranell diouzh al lab. Goude bezañ lakaet en
e gichen, war ar bank a-dreñv, kignen, bara lin ha sistr, eñ o kre-
giñ er rañjenn, ha diwar urzh ar beked, evel dre e nerzh e-unan,
setu ar c'harr o skarzhañ gant ar foeltr a-dreuz ar gêriadenn etre-
ad ar forest, ken a strake war an erc'h hag ar skorn. A-raok ti-
zhañ ar c'hoadeier, e oa dav treuziñ kêr, unan vihan hepken avat.
Pa welas bourc'hiz ar c'harr o vont evel-se distlej-rik, setu int o
terdek da zigeriñ o ogelloù, hag ar re en em gavas war an hent a
voe diskaret, bloñset ha gloazet zoken, gweturioù a voe lakaet war
o genoù. N'eo ket c'hwi 'lar, ken a oa spontet-mik ar merc'hed hag
ar vugale !

Degouezhet er c'hoadeier, setu Piekuch o c'hourc'hemenn etre daou
c'henaouad bara lin :

"Bouc'hal, troc'h er gwez-mañ,
Ra vo fagodet kêrkent,
Ra vo berniet er c'harr,
Ha kuit da ruzata !"

Hag e voe graet prim ha brav. Neuze, Piekuch war e giz gant e garr
leun a goad. Met kêriz a oa o c'hortoz anezhañ da dremen ; dont a
rejont a-benn da gregiñ en dranell, da sachañ an inosant er-maez,
hag int o vont dezhañ a daolioù dorn hag a daolioù treid.

Souezhet-mik e voe Piekuch, ken genaouek ma oa eñ ma soñjas dezhañ
da gentañ e oant o c'hoari gantañ, met pa santas e kouste re ger
d'e lêr, e lavaras etre e sant hag eñ :

"Setu amañ marteze moc'h...
Diwar urzh ar beked,
Ra zeuio din dres
Ar pezh a c'houlennan :
Koad, gra un tamm frotañ
D'an holl gañfarded-mañ".

Kerkent en em gavas difagodennet ar c'heuneud, hag int da vont d'ar
vourc'hizien gant taolioù rust ha da c'hwiñañ anezhe evel ma ra
freilhoù war al leur. Fidambie, ne chomas ket pell kêriz da c'hor-
toz o c'hemend-all, a c'hellit krediñ. Ha Piekuch a skarzhas en ur
c'hoarzhin da gas e gargad koad d'ar gêr ha da dommañ.

Deut e oa un tamm brav a vrud da baotr e fornigell ha deredek a rae d'e welout bagadoù tud gwashoc'h eget mont d'ar foar. Kement ha ken bihan ma lavaras ar roue d'e velestrour :

"Kit da gerc'hat din an istrogell-se".

Hag hemañ oc'h erruout ha gourc'hemenn taer da Biekuch :

"Diskenn diwar da fornigell, genaoueg a zo ac'hanout, ha deus ganin d'ar palez.

- Me zo estonet ganeoc'h, eme an inosant, mont d'ar palez ! N'eo ket kignen, bara lin ha sistr a ra diouer din amañ."

Pa glevas an aotrou ar c'homzoù divergont-se, e savas droug amañ hag ez eas gant skouarniadoù d'ar paourkaezh. Hemañ neuze, lez fiñv ebet, da rannañ etre e zent :

"Va skub-balan, er gêr emamp,
Taol an amprevan-mañ er-maez."

Ar valaenn, poultrennek tout evel ma oa, a yeas c'hoazh d'ober un tamm soubañ e dour lous an torch-listri, ha kerkent goude da lapaat druz ar sac'h-c'hwez gant ur penn ha d'e gotisañ gant ar penn all. Met ar mevel-bras ne oa ket kustum, evel just, ouzh fest ar vazh ; pennfolliñ a reas, lammat dre ar prenestr ha mont da gontañ d'e vestr an dismegañs a oa bet graet dezhañ. Ar roue a gasas ur c'hargiad all, met hemañ a voe finoc'h eget e genseurt. A-raok degouezhout dirak paotr e fornigell, e c'houlennas digant an dud ar pezh a blije dezhañ.

"Deus ganin, Piekuch, da di ar roue ; c'hoant en deus da reiñ dit ur boned ruz, ur gouriz ruz hag ur re heuzoù ruz.

- Ma feiz neuze, eme an inosant, diseblant, evel m'am eus amzer, ez an da vont ganit ; kerzh a-raok, ne vin ket pell oc'h adaptout ac'hanout, na ne vin".

Aet mevel ar roue kuit, hor paotr a gemeras amzer d'ober ur pred kignen ha bara lin ha da gas un toullad chopinadoù sistr war-draoñ. Goude ur c'hofad evel-se, lakeda, netra gwelloc'h eget ul lajad kousket... Dihunet e voe gant unan eus e ziv c'hoar-gaer :

"Tremen poent eo dit skarzhañ."

Fiñv ebet, met kregiñ a reas ar pabor gant e lavarenn hag echuiñ a reas evel-hen :

"Evel m'emaon aze, kuit da vezañ re hejet,
Ra vin kaset war-eeun da di ar roue".

Setu ar fornigell o kemer toull an nor hag an hent goude, buanoc'h eget na soñj deoc'h, en ur zivogediñ spontus - rak an avel a c'hwezhe war an tan - dreist-holl pa zigoras drezi hec'h-unan an dorikell. Ne voe ket pell ar wetur a c'hiz nevez hag he ferc'henn o tremen dirak ar c'hargiad, lezel anezhañ pell war-lerc'h hag erruout dirak ar palez.

Pa voe lavaret se d'ar roue, e teuas gant tud e lez war an treuzoù hag e welas Piekuch kludet war e fornigell o chaokat kignen, bara

lin, hag o lonkañ sistr e-leizh e jave, kuit d'ober van outañ nag ouzh den.

"Setu amañ marteze ur penn-maout, eme ar roue... Hep ! gwaier, piv a vez graet ac'hanout ?

- Ataoe 'zo, Piekuch ar genaoueg.

- War betore micher ez out ?

- Me, mar plij, a zebr kignen ha bara lin hag a ev sistr.

- Petra a fell dit ?

- 'Taoe 'zo, me zo deut, eus ec'h on, da gerc'hat an traoù ruz ho poa d'ober kinnig din".

D'an ampoent, setu merc'h ar roue, koant evel an deiz, o regouezhout e krec'h ar pondalez. Piekuch a voe bamet o welout ken kaer krouadurez, met bamet-lip neuze, ken na soñje ken er profoù ruz a oa e sell ha gaout. Ma oa chomet mut, soñjal a reas da vihanañ etre e roched hag eñ :

"Diwar urzh ar beked...

Prifsez ken koant ha ken glorus,

Ra zeui da garout adhanon".

Ar Piekuch da skarzhañ d'ar gêr, war e fornigell, da c'hortoz... Digeriñ a reas an nor hec'h-unan dirazañ, hag eñ da ziskuizhañ en ur zebrif kignen ha bara lin, hag oc'h evañ sistr gwashañ ma c'helle.

E-keit-se, e klogore kalon ar briñsez yaouank gant ar garantez, ur garantez divent ha didrec'hus, ken e kouezhas war he daoulin dirak he zad evit pediñ anezhañ d'he lezel da zimeziñ gant Piekuch. Ar roue, se 'zo sklaer, a c'houlennas diganti pe sot pe nay e oa. Met ne servije ket ; kregiñ a reas kerkent ar plac'h yaouank da zizeriñ ha marvet e vefe bet hep mar na marteze ma n'en defe ket roet urzh he zad da vont da gerc'hat an inosant.

Met Piekuch n'houlle ken mont diouzh ar gêr, ken evurus evel ma oa. Hogen kannad ar roue a roas dezhañ kement a chufere dous da lonkañ ken ne ouie ken ar paour kaezh penn-brell ar pezh a rae. Ne voe ket diaes neuze hualañ ha pennaskañ ar paotr ha kas anezhañ d'ar roue a c'halvas un achantour hag a c'hourc'hemennas groñs dezhañ - gopraet pe gastizet e vefe hervez e ijin - klozañ an daou amourouz en ur varrikenn wer ha kas anezhe diwar e dro da gantreal e-mesk ar c'houlmoul, rak imor fall a oa ennañ, ha ne doc'h ket souezhet, moarvat !

Ar strobinneller a gemeras en e sac'h ur c'hwezhegell valum, a stagas outi ur bluenn waz hag a c'hwezhas enni ken ne voe deuet da vezañ kement hag ur bern foenn ; amariñ start a reas neuze ar c'hwezhegell ouzh ar varrikenn wer e oa bet lakaet an daou labous enni, ha setu homañ o sevel d'an nec'h buanoc'h eget avel miz meurzh, uhel-uhel, uheloc'h zoken eget ar c'houlmoul.

Ar briñsez en em lakaas da ouelañ dourek o welout e peseurt parizon

e oa hag a bedas Piekuch da zieubiñ anezhi :

"Ta, ta, ta, kaezhig, te a zo kerkoulz amañ hag e lec'h all !",
emezañ.

Met kement a bedas hag a aspedas e zousig anezhañ, ken e teurvezas,
diwar urzh ar beked, diskenn ar varrikenn war un enezenn. Kentañ
tra a reas neuze a voe lakaat degas dezhañ kigen, bara lin ha sistr,
ha meuzioù finoc'h evit e vuiañ-karet. Homañ avat, he doa aon da
gousket hep toenn ebet a-us d'he fenn ha setu Piekuch, diwar urzh
ar beked madelezhus adarre, o lakaat da sevel war-eeun diouzh an
douar ur c'hastell ha ne voe ket ur vezh gwelout anezhañ.

Evel ma ne oa nemete war an enezenn, e kavas ar paour kaezh priñs
hir an amzer a-benn daou zevezh, hag e voe ret da Piekuch gouezh
gant e besk hollc'halloudek stagañ an enezenn ouzh an douar-bras.
Ne oa ket peurrannet gantañ e lavarenn, pa weljont diraze ur poñ
gwer difistur, hir-hir, war beulioù aour-tout. Mont a rae betek
porrastell kastell tad ar briñsez.

Dres evel ma oa Piekuch o vont da sevel e droad war an dreuzell
vurzhudus-se, e chomas a-boz da soñjal, hag e tremenas evel ul
luc'hedenn en e spered. Evel mezh a oa deut dezhañ o soñjal e oa
vont da erruout e lez ar roue ; kompren a reas souden, sklaer-sklaer,
e oa disheñvel diouzh an dud all. Neuze, evit ar wech diwezhañ, eñ
da stagañ gant e lavarenn :

"Diwar urzh ar beked,
Ra zeuio din dres
Ar pezh a c'houlennan :
Fellout a ra din bezañ ken speredek
Hag ar re holl a anavezan".

Piekuch ne oa ken ar memes den, ne oa ken ur genaoueg, na zoken un
hanter hini, deut e oa war an taol da vezañ ur paotr fin ma oa unan,
seven ha kran evel mab un aotrou uhel. Gant ur c'harreoz, ec'h erru-
as an daou amourouz 'tal-kichen derezioù ar palez e-lec'h ma taou-
linjont dirak ar roue da c'houlenn digantañ bennigañ anezhe.

Kerkent e voe euredet an daou yaouank, ha pa welañ ar roue pegen
cheuc'h ha pegen speredek e oa e vab-kaer, e reas e soñj leuskel
gantañ e garg, met diwezhatoc'h, rak serzh mat e oa c'hoazh. N'eo
ket tud faro a vanke en eured-se, se 'zo sklaer, cholori a voe ken
a voe, ha diskenn a reas frank ar boued hag an evaj war-draoñ.

Kuit da astenn ar gaoz, ec'h anzavin deoc'h e oan bet pedet ivez
ha ken brav e voe din hag ul logodenn er bleud.

Kig hag amann a yae ganin evel fars gant tad-kozh ; lonkañ a ris
chouchenn ha gwin e-leizh va jave ha tout ar pezh am eus klevet du-
hont am eus dibunet deoc'h, eus am eus.

(1) Da vezañ distaget "Pietsoch", a-hervez.

*O lenn talbenn ar gontadenn-mañ, ho po komprenet n'eo ket dour eus va fuñs ha n'eo nemet un dra
adtommet. Ataoe 'zo, kavet em eus anezhi e galleg e niverenn 74 (bloavezh 1957) Le Pays Breton -
Bro Vreizh. Ar gelaouenn-se a veze, evel ma ouzoc'h, embannet gant hor mignon bras Yann Choleau.
Ur wech an amzer ec'h embanne hemañ evel-se un danevell dindan an titl Contes et légendes d'Europe
Centrale, hep sinadur ebet. E-mesk ar paperoù a zo deuet din war e lec'h, ez eo c'hoarvezet ganin
kavout, dre zegouezh, ar c'haieroù (tri garterad tanav) a denne ar c'hontadennoù-se dioute. Skrivet
int bet, moarvat, diouzhtu goude ar brezel pevarzek, gant ur c'habiten Farouel hag e wreg, ganet
Pommerol. Diouzh gwelout ar c'haieroù-se hag ar pezh a zo merket war goloenn pep hini anezhe, eo
sklaer ez int bet prenet, ha leuniet ivez, emichañs, en Alamagn.
Siwazh, an darn vrasañ eus an danevelloù a zo bet berraet ha n'eus anezhe nemet un toulladig linennoù.
Gellout a raten treiñ c'hoazh unan bennak all, ur blijadur hag un diskuzh eo evidon plêal evel-se gant
kaozioù poblek.*

E. ar B.

KELEIER BERR

UR BELEG NEVEZ. - Beleget eo bet Yann Talbot, pennrener Kuzul ar Brezhoneg.
Setu amañ al lizher en deus bet skrivet en degouezh-se :

Yann TALBOT a zo laouen o kemenn deoc'h eo bet beleget evit servij Doue hag
e bobl, gant an Ao. 'n Eskob Sant-Brieg ha Landreger, d'an 30 a viz Meurzh 1974, e iliz-
parrez Itron-Varia Rostren.

Ho trugarekaat a ra a greiz kalon evit ar perzh ho peus kemeret el lid-se, hag ar vigo-
niezh ho peus diskouezet dezhañ e meur a stumm.

E vennad a zo gouestlañ e vuhez da zerc'hel bev spered Aviel Jezuz Krist, ha da sikour
koment den a glask ar wirionez d'he c'havout ha d'he c'harout.

Goulenn a ra digant ar gristenien e harpañ dre o fedenn hag o c'henlabour, hag an holl
dud a youl vat krediñ en e c'hoant stourm ganto evit ar frankiz.

D'ar Sul, 21 a viz Ebrel 1974, deiz Sul ar C'hazimodo, e teuas da Lanvezeg da ganañ an ofe-
renn-bred ha da brezeg. Paotred ar Skinwel Belgiat (gallek) hag a oa o tremen dre Lannuon,
o vezañ klevet ar c'heloù, a zeuas da filmañ ar Gouel. Ha goude an oferenn, e voe goulen-
taet ar beleg nevez diwar-benn Breizh hag he c'hudennoù.

EURED. - E Konkernev d'ar 27 a viz Ebrel, eo bet euredet Patrig Morvezen ha Katrin
Dhellemmes. Mab Loeiz Morvezen, bet sekretour Kuzul ar Brezhoneg, ez eo Patrig.
Gourc'hemennoù d'ar familhoù.

GANEDIGEZH. - Setu ar c'hemenn bet degaset da Varr-Heol, gant hor mignoned Ivon ha
Gwenola Abiven :

Lenaig hag Eneour a zo laouen o kemenn deoc'h eo krasket an dud en ti gant ganadi-
gezh o c'hoar vihan ARZELA.

E Montroulez, d'ar 1añ a viz Mae 1974.

Ivon ha Gwenola Abiven
Kerjezekel
29223 Pleiber-Krist

Ur verc'h vihan da Ernest Barzig, hor c'henlabourer, ez eo Arzela (Doue d'he bennigo !).

DISKROG-LABOUR OC'H ECHUIN. - Goude bezañ bet pemp miz diskrog diouzh o labour, ez eo aet en-dro tud al lazhadeg-yez eus Pederneq d'o labour; e deroù miz Mae. Kestoù, festoù-noz da zastum sikourioù evit an dilabouridi a oa bet graet un tamm e pep lec'h. Start eo bet an traoù avat.

TERZHIENN AFTEK war al loened. - Nebeut amzer goude an doureier bras diruilhet war Vontroulez ha war veur a hini eus kêrioù Breizh (c'hwevrer 1974), ez eus bet kouezhet ur waleun a gostiz war ul lodenn all eus Breizh, diouzh tu ar Reter eus departamant Aodoù-an-Hanternoz (22) : an derzienn aftek pe ar c'hleñved treid-ha-geoù deuet war ar saout hag ar moc'h. Kerkerent ha ma kouezhe klañv ul loen bennak, e veze ret diskar ar c'hraouiad a-bezh. Kraouiadoù saout-laezh eus ar bleuniusañ a zo bet distrujet evel-se. Tud ar Skinwel e doa bet ar soñj iskis da filmañ ar seurt lazhadegoù : ne oa ket ar bobl evit gouzañv ur seurt arvest war ar skramm bihan, ken kriz ha ken dinatur evel ma oa... Bloavezhioù ha bloavezhioù a vezo ezhomme evit adsevel kraouiadoù nevez. Glac'haret-naet e oa perc'henned al loened o welout plantañ o loened evel-se, ar re yac'h evel ar re glañv. Difennet e oa bet foarhañ bodadegoù-tud, hag aliet zoken ar gristenien da chom er gêr e-lec'h mont d'an oferenn. Ha pa soñjed e oa echu gant ar reuz, eo bet addeuet 'kosteiz Lambal, e Sant-Aaron, ha roet urzh da ziskar daou vil pemp kant a loened (saout ha moc'h). Evel-se, en holl zegouezhioù seurt-se, ne ouzer ket eus a beñc'h eo deuet ar c'hleñved. Nemet en em c'houlenn an dud hag-ehñ e oa ret aberzhiñ o loened a-viliadoù, zoken ar re yac'h.

KAMP AR VREZHONEGERIEN. - E Pont-e-Kroaz, Bro-Gernev, nepell diouzh Kemper, e vo dalc'het *Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien*, eus an 22 a viz Gouere betek an 10 a viz Eost. Goulnn doareoù resis digant an Itron de Bellaing, 28 rue des 3-Frères Le Goff, 22000 Sant-Brieg.

GWYNORO JONES E STRASBOURG. - Gwynoro Jones eo an depute hag en devoa trec'het war rener *Plaid Cymru*, Gwynfor Evans, war-bouez teir mouezh, er mouezhiadegoù diwezhañ (kentañ a viz Meurzh). O vozañ m'eo dileuriad da Guzul Europa, e Strasbourg, ez eus bet fellet dezhañ ober e ziskleriadur e kembraeg, evit diskouez ez eus estreget saozneg e Breizh-Veur. Sebezet an holl ! Dambrest moarvat, e vo klevet un dileuriad breizhad bennak oc'h ober kement-all, e brezhoneg. Met ar Vretoned, goude disammañ o c'houstiañ evel-se, a adkrog kerkerent da gousket.

DOUR KEMBRE. - Trouz a zo savet adarre diwar-benn dour Kembre a vez kasetda gërioù bras eus Bro-Saoz, hep reiñ tamm digoll ebet en-dro, ken a-barzh ar fin e ranko Kembreiz o-unan paeañ keroc'h o dour en o bro eget ma ra ar Saozon. Soñj o deus hol lennerien eus an drouz a oa bet e Kembre pa oa bet savet stank vras ar Trewerin ha beuzet Chapel Celyn (Chapel Kelenn).

SKINWEL KEMBRE. - Bec'h a zo da vat etre *Cymdeithas yr Iaith* hag *Urdd Gobaith Cymru*, diouzh un tu hag a fell dezho kaout ur chadenn a-ratozh evit ar gembraegerien, hag ar c'helenner Jac.-L. Williams a lavar e vefe kement-se lakaat ar yezh e riskl da vervel. Evel ma ouzer, e vez abadennoù kembraek war ar chadennoù skinwel bras : B.B.C. ha Kompagnunezh Harlec'h. Kalz eus ar re a zo war harzoù Bro-Saoz o chom, o deus troet o restell etrezek skingslec'hioù Bro-Saoz evit chom hep bezañ direnket gant an abadennoù kembraek na gomprenont ket ; ha Jac.-L. Williams a lavar evit e rêzon, ne fglevfe mui ar bobl kembraeg er skinwel, peogwir ne seloafent ket ar bederet chadenn. Yezh ur vinorelezh eo deuet ar c'hembraeg da vezañ e Kembre hag ar re a zo an tu kreñv ganto a ra fouter-kaer kalz anezho eus ar yezh-se.

SKOL-VAMM GEMBRAEK E PATAGONIA. - Kant vloaz 'zo (1865), e voe diazezet trevadenn ar gembraegerien e Patagonia. Abaoe un toullad bloavezhioù e oa anat edo ar c'hembraeg o vervel, ha ma oa bet miret giz an Eistezvedoù, ez eo e spagnoleg e veze graet ar gouelioù-se. Troet e oa bet ivez e spagnoleg kalz eus an imnoù kembraek. Ma ! setu ma'z eus bet savet nevez 'zo ur skol-vamm da zeskñ ar yezh en-dro d'ar vugale. Kalz muioù-ha intrudu o deus Kembreiz, 'm eus aon, eget ar Vretoned.

70 MILION DA REIN LANS D'AR C'HEMBAEG. - E skolioù an derez kentañ, e vez desket kembraeg hag evel-se ez eus bremañ e skolioù an eil derez tud yaouank bet desket ganto ar yezh. D'o skoazellañ da beurzeskiñ ar yezh, en deus votet Kuzul ar Skolioù ur yalc'had a 70 000 000 a Lurioù.

EMBANNADURIOÙ BARR-HEOL EVIT AL LIDEREZH

| | | |
|---|--|---------|
| 1 | LEKSIONAL ar Suliou hag ar Gouelioù (dre offset) | |
| | Bloavezh A | 16,00 L |
| 2 | Bloavezh B | 18,00 L |
| 3 | Bloavezh C | 16,00 L |
| | AN TRI BLOAVEZH WAR UN DRO | 48,00 L |
| 4 | LEVR-OFERENN : Azvent - Nedeleg - Epifaniezh | 10,00 L |
| 5 | LEVR-OFERENN : Korreiz - Pasion - Pask | 11,00 L |
| 6 | LEVR-OFERENN : Amzer-Pask | 11,00 L |
| | AN TRI LEVR-OFERENN WAR UN DRO | 30,00 L |
| 7 | LEVR-OFERENN : GOUELIOU AR SENT | 25,00 L |

LENNADENNOU PEMDEZIEK

| | |
|---|---------|
| Bloavezh 1, Peder levrenn, pep hini | 7,00 L |
| AR BLOAVEZH KLOK | 25,00 L |
| Bloavezh 2, Peder levrenn, pep hini | 7,00 L |
| AR BLOAVEZH KLOK | 25,00 L |

RITUALIOU ROMAN

| | |
|--|--------|
| Ritual Sakramant ar Briedelezh (liesskrivet) | 6,00 L |
| Ritual nevez ar Vadeziant (gant tonioù) dre offset | 5,00 L |

GOULENN AN HOLL LEVRIOU-SE

DRE CHEKENN-BOST
PE CHEKENN-BANK

Revue Barr-Heol : Buhulien 22300 LANNION,
K.R.P. 245-453 Roazhon.

Merkit war ho chekenn ar pezh a vennit hag e viot servijet kerkerent hep mizoù kas. Erbediñ a reot timbroù hag espern a reot ivez amzer ar re a ra war-dro ar gelaouenn pe ar c'hasadennoù ! Trugarez !

KOUMANANT DA VARR-HEOL

| | |
|---|---------|
| Koumanant ordinal (Breizh ha Frañs) | 25,00 L |
| Studierien : | 20,00 L |
| Broioù estren : | 28,00 L |

Dre breñañ embannadurioù *Barr-Heol*,
e sikourit ar gelaouenn da vevañ

Prenit :

Levr-Oferenn Gouelioù ar Sent,

ur pezh pikol levr liesskrivet : 25,00

DRE AR POST : 26,00

Ritual ar Vadeziant, dre offset: 5,00

Goulenn al levrioù dre chekenn :

Revue *Barr-Heol*, Buhulien 22300 Lannion

C.C.P. 245-453 Roazhon

Imprimeur : abbé Yv. Le Gall, Copie 22 Pederneq.
Mouler : an Aotroù Gall, person Pederneq.

Directeur de la publication :

M. Le Clerc, Buhulien 22 Lannion, Gérant.

Rener ar gelaouenn :

an Aotroù Klerg, person Buhulien 22 Lannuon.

Périodique inscrit à la C.P.P.P.
sous le n° 29 746.